

45027

Y.L.M.

RIMODELLOU

PADRIG HELLENN

FB
891.
681
LEN

**Brud Nevez
Emgleo Breiz**



**Bet embannet gand skoazell
Skol Uhel ar Vro**



Document numérisé en 2025

Bet embannet gand Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.
Bet moulet gand Mesidou, 40bis, ru ar Republik, 29200 Brest.
Bet diskleriet hervez al lezenn : pevare trimiziad 1990.
© Peb gwir miret striz gand Y.L. M. ha Brud Nevez.
N° I.S.B.N.: 2-86775-086-5

RAKSKRID

gand

PER-MARI MEVEL

- ha gand aotre e anaon -

"POUR BRAN:

Ganin gwall-zamm war va spered
Am-eus gwelet e-toull ar gloued
Bugaligou daoulagad glan,
O divreh leun a vleun pour-bran.

Kinnig a ra paotr ha paotred
D'an dud o bleuniou a vriad.
Prenit, prenit a galon vad
Danvez melen ho levenez!

Hag e tremen kant ha kant all,
Teñval o zal, heb ober van,
Heb ober van ouz ar pour-bran
War hent divleun o buhez dall."

(e Brud. Nivrenn 1. Hafiv 1957)

Ha rakskrid all gand an aozer

LIZER SKRIVET DA B.M. MEVEL, RENER "BRUD"

diwar-benn liziri kenetrezom
pe pennadou am-eus lennet du-mañ ha du-hont
ha krogadou, gwall-grogadou, an deiz hirio
'tre Bretoned gand brezoneg
war zigarez lizerennou re anezo pe re nebeud
doareou skriva, doareou prezeg,
n'ouzer dare ped anezol!..
daoust ma fellfe d'an oll dud-se, gwitibunan,
reizskrivadur ha yez unvan
nemed unan,
gand ma vefe eeun e hini
da bep hini

"....Setu amañ ar remerkou a ran en eur lenn ho pennadou:

– avel vraz a zo reiz (*a* hir; *braz* ne glot ket mad gand *chas* (*a* berr, *chas*)"

– Hollez hollez! aotrou: ne glotont tamm ebed. Med "du-mañ" en oll barrez a-viskoaz, an avel a vez *bras* ha *bras* ivez ar glao: eur stumm poueza? –*avel vras ha glao bras a vir ouz ar chas da gas ha glao bras* pe *avel vraz* a lakafe an dud da hoarzin du-mañ pe da ober sin ar groaz gand brezoneg sarmon sul...

Ha "Mad" ivez a vez gantañ memez c'hoari diouz an doare: eur gwaz *mat* na vez ket atao eur gwaz *mad*, na *mad* eur barrad *mat*. Dibarderiu direiz? med red, aotrou, ken resiz all o ster, evidon-me ha va henvroiz du-mañ!"

– "Ya, reizet e vo ho parzonegou, hep touch evel just euz al lusk nag euz doare ar gwerzennou.

– Doue ra viro, aotrou, Doue ra viro!... Nag euz ar hlotennou, nag euz geriennou 'zo, nag euz dibarderiu all zo ivez! Med reizit pep tra all, mar plij, aotrou, evel just. Evel just: diouz ho skrivadur."

– "Gweled a ran e rit aliez gand an doare-skriva KLT, n'eus forz.. Adskriva a rin ar barzoneg a-raog her has d'ar mouller.

– Ya, aotrou, n'eus forz, pe diana me na ran ket forz. Evel just evid brud vad ar gelaouenn, doujañs ar skolaerien ha skwer vad ar skolidi hag arhant ho koumananterien, c'hwil a raio hervez ho "kwir relijion" gand an doare-skriva.

Daoust ha kement-se... Ma! "tañpir": gand ma n'ez ay ket barzoneg da yez plên, na yez du-mañ da yez du-hont.

Perag ne ran ket me va-unan? –Bo! leziregez... diouiziegez...

Re goz bremañ va fenn kaled evid ober diouz reizennou zo re nevez pe nevezet re aliez!

–Red eo implij geriou a vez kavet er geriaduriou, peotramant lakaad eun notenn. Da skwer petra eo: *muga*, *digavandenn*, *herpal*....

–Hopala! aotrou, notennou mar plij, notennou 'vad!

Gand notennou seurt d'ar re-se zo bet greet "teñzoriou ar yez komzet", eur mell leor, ha pajennou "brezoneg beo" e kelaouennou a bep seurt.

E-leiz eur harned em-eus "deuzouto"!

Med ouspenn, eur geriadur am-eus ivez: ra vo meulet Roparz Hemon! Sed e ran-me diouz e zoñjou. Peurliesha.

Hag er gêr-mañ pezh *zo muga* 'vefe *buga* er geriadur?

Ha marteze *herpal* du-mañ a zo *herzel* dre 'z-amañ pe *harpa* e leh all?

Kalz "teñzoriou" or-beus a seurt-se: grotuill koz, peziou moneiz displeberet o arouezioù! Kant parrez, kant savar, med marteze ken eul lavar.

Penaos ober? e-giz ma ran-me: gand ger klevet, gand ger lennet, an eil da gas d'egile, beb an nebeud vo unvanet: dre ma varvo brezonegerien ha brezonegou du-mañ ha du-hont, ha tabuterien an deiz hirio, e vo red da re warhoaz brezonega gand nebeutoh med kalz eeunoh. Ha tabutal gand ol leoriou!

Ne verno ket d'on eskern kraz.

–D'am zoñj eo gwelloc'h ober ar hemmadur S/Z evel ma vez greet er brezoneg komzet (*saout*, *ar zaout*) hag ive gand CH/J (*chadenn*, *ar jadenn*). Pa ne vez ket greet eo kaletoh an distagadur."

– D'am zoñj ivez. Plijet ken gand ar re all kavoud mad or zoñj... Ya, gwelloc'h eo ober evid c'hoaz evel ma reer gand ar brezoneg en-dro deom, gand ma ne ve ket brezoneg saout.

Forz penaoz, pa skriven *ar saout* (gand bolonte vad unvani) e ouien a-walh, en eur lenn, laroud *ar zaout*.

Forz penaoz, n'eus yez ebed a hellfed skriva evel m'he hlever: gand peb genou eur rannyezig pe eur ragach!

Skrivet er mod-mañ, skrivet er mod-se, d'ar skolaer ha d'ar mouller eo o labour.

Med lenn er mod-mañ, lenn er mod-se, da beb lenner eo an afer!

Ha ma lennit barzonegou, eur mod hepken: diouz mod an aozer... pe n'eus barzoneg ebed ken.

Hag an aozer na hell ober barzonegou nemed e doare ar yez komzet en-dro dezañ, ha klevet gantañ a vihanig he fouez- mouez.

N'on ket chalet gand *chadennou* pe *jadennou* e yez plên. Med e gwerzaouriez zo *chadennou* on trechalet ganto, ha muiohig eun tamm mat!

Med rannyezo vezo ato keit ha ma savor barzonegou 'mêz da Roazon ha da Bariz.

(liziri a viz Here 1973)

..." Red eo degas da zoñj eo bet krouet BRUD, ouspenn 15 vloaz 'zo, evid embann danevellou, barzonegou, pennadou a bep seurt e brezoneg yah, pobleg, an tosta gwella ouz an hini komzet c'hoaz gand an dud deuet bremañ eun tammig war an oad, bet ar brezoneg yez o bugaleaj, hini o labour pemdezieg. Evidom-ni, an dud-se a zo perhenn d'eun tefizor speredel, prest siwaz da vond da netra...

Hirio an deiz, ha gwell a ze, eur rummad niverusoh- niverusa a vugale, a yaouankizou, a studierien, a zo krog da zeski ar brezoneg, gand sikour al leoriou dreist-oll, heb kaoud an eurvad da veva e-touez Brezonegerien. Eur yez nevez koulz lavared, a gemer buhez dirazom. Marteze e vank enni a-wechou an troiou, ar stummou-lavar a ree evidom blazenn dispar ar brezoneg a glevem o kana war vuzellou Leoniz pe Gerneviz. Arabad kaoud keuz koulskoude d'ar yez koz o vond da vervel, peogwir ema unan nevez oh advleunia war ar hefiou dizehet."

(Stagadenn da VRUD. Nenn 1. Diskleriadur)

Hag evel-se bezet graet!

Hag evel-se 'ta e teuio eur mare ha ne vo kavet brezoneg beo nemed e leoriou ar re varo.

G .S. 1990

Eur rimodell zo eur gontadenn hirig e leh-mañ-leh. Ablamour da betra eur rimodell? N'ouzon dare.N'eus rim ebed. Hag e leh all (dre zu-mañ) eun tamm barzoneg berr,diod a-walh, med gand rimou druz, da ranezenni d'ar babiged war ho parlenn...Ha rimodell (rimadell ma karit) eo ar gwella hano am-eus kavet da gement ha kement d'ar ger galleg "rondeau": eur stumn barzoneg rik ha striz a drizeg gwerzenn e tri goublad (pe eiz gwerzenn en eur houblad : daou rumm "rondoioi zo!)

war diou glotenn ken. Eun draig dister da laroud hag adlaroud traouigoù dister, evid barzed berr-alan hag eun tammig pismigerien. Ha randonerien ?... Setu ne gavoh amañ na "reflexionou profitabl" na "prederiennou dreist-speredel". Ar peb gwella 'gavoh eta (d'am zoñj!) n'eo ket an danvez, med ar stumm : fellet 'n-eus d'an aozer ober war batrom kantikou latin gwerzaouet gand rimou ha pouezioù-mouez o tond ingal an eil dindan egile diouz eur werzenn d'eben,gand memez lusk pe dost a-hed ar houblad. Grit eur zell piz ouz ar "Veni Sancte Spiritus", ouz al "Lauda Sion", ouz an "Dies iræ" ha re all. A dra-zur n'eo ket doare gwerzaoui ar varzed latin klasel. N'eo ket kennebeud hini or hantikou abaoe an Tad Maner. (Siwaz!) Soñjal a ra din eo peuz-par ar pouez-mouez brezoneg d'an hini latin. Ha d'an hini saozneg, germaneg ha ped all en Europa? Pa zaver tier gand memez danvez eo red mañsoni e memez doare... Ma vije bet ken boaz or hleved ouz ton ar saozneg hag ouz ton ar galleg, e soñj deoh e vije bet greet gwerzennou brezoneg hervez reolennoù ar re halleg? - Nebeutoh aze sur a-walh rag muioh a labour zo gand eur mod eged gand aur mod all.

Diskleriadur

gand eun Aozer a youl-vad
d'eun embanner a houl gwelloh.

Kemper d'an deg a viz du 1973.

I

Aotrou Rener,
Kenta hini din da lenner,
Ho kouiziegez zo bet feuket
Gand drocherez ken difetet
Ma skrivadur a "delenner"!

A yezadur oh abienner.
War yezadur n'on ket desket.
Bezit ivez ma helenner:
Eo ho tever beza feuket.

Mennoud 'ran-me 'vel ma venner
D'ar skrivadur zo reketet.
Reizit din-me traou rebechet:
Kemmaduriou a zrohenner.
- 'Vid plijadur kaoud eul lenner!

II

Ha koulskoude, Aotrou Rener,
'Vid plijadur beza lennet,
Ne vin morse diwriennet
Diouz ma farrez, hi ma enor...

Bez' eus geriou ha n'o hlever
Nemed du-mañ? Traou divennet?
Bez' eus stummou eo eun dever
O dilezel e yez c'hwennet?

Red eo ober soubenn-wener?
Red eo eva lêz diennet?
War zigarez boued kempennet!
'Vid plijadur tri-hant prener!
- Tamm ma hini, Aotrou Rener...

III

Na ma enor.- Ya, ma enor:
Rag ma farlant parrez Gwezeg
'Ve hervezo tra ken mezeg?
He geriaoueg eun dizenor?

Meulet 'vezor ma sevenor
Ouz lezennou pe wir-brezeg?
Me nemedon vo dienor
Gand ma farlant parrez Gwezeg?

Pa ne greder ken nemedor:
Em brezoneg on diou-yezeg
Gand skol-veurieg ha stlabezeg
Ma yez du-mañ - ha zo "teñzor"
Koulz ha du-ze, hag eun enor!

IV

Gand ma kavo d'he enori
Skridou nerzuz hag aweneg
Hag he savo da yez lenneg
Daoust da galzig da imori...

Daoust da galzig da fulori
Bez'e vezin groñs ha penneg
Gand ma orin da enori:
Bez'et din-me bez' aweneg!

Na bruderez ha cholori
Gand Malmancheg tud Plabenneg!
Gand Drezennaj Bigoudenned!
Bebet ennon youl eñvori
Geriou du-mañ 'm-eus d'enori!

V

Da bep parrez giz ha giziou
Keit ma padont heb damantiz:
Koef dantelez a beb atiz,
Krenn chupennou ha gourizou...

Da bep kanton e ilizou
Keid m'o deus-int parrezioniz...
Da bep parrez he divizou...
Da beb micher beb ampartiz...

Da bep plahig bragerizou
Diouz he danvez hag he c'hoantiz.
Da bep plahig he chalantiz...
Da beb barzig e frankizou
Diouz e barrez hag he gizioù!

VI

Med da houde?... Pa vo echu
Gand brezoneg beo-buhezeg?
Pa vo galleg gand re Wezeg?
(Kredi 'ran-me 'ma war erru!)

N'eus ket eostad gand miz Kerzu,
Deil na frouezenn er strouezeg,
Med treujennou, pa vez echu
Gand Gwengolo beo-buhezeg.

Gand trefoedach pa vo trefu,
Da vrezondeg treud ha peudeg
Vo treujennou er geuneudeg,
Med 'n ol leoriou mir ha repu
Gwir-vleuñvennou -pa vint echu!

VII

Poaniom neuze da bennaoui
Kement boked ha bokedig
War o diskar ken anouedig,
Keid ma padont d'or badaoui.

Poaniom neuze da zilaoui
Yez hon tadou, i ken skeudig;
Poaniom neuze d'he louzaoui
'Vid on hêred ken amgredig,

Hag o gwelom o henaoui
Gand treuz-giziou ken reuzeudig!
Daoust d'on hêred bez' nebeudig,
Poaniom ato d'o dihaoui,
Poaniom ato da houlaoui.

VIII

Set' arabad nah on eien,
Ni bugale o four-brini
A ginnigem da bep hini
A-vriadou, moused-kreien!

Gand ma mamm-me oa giz Pleiben.
Giz ar Porze gand hoh hini?
Set' arabad nah on eien
Na levenez or pour-brini

A zivere druz o hreizenn
'Kreiz or bruched... Hep gwarizi
Bezeta 'trezom helebini
Gand briadou 'nez eur zeizenn,
Rag arabad nah on eien.

IX

Ha kement-se, em gwerzennou
Euz ma liorz pe va fradenn
Ma ve ganto divnadenn
Pe souezenn gand geriennou

Zo anezo hiniennou
A dalvezfe eur studiaden...
Da lennerien ma gwerzennou
Euz ma liorz pe ma fradenn,

Ni a raio gand notennou
Eur heriaoueg 'traoñ ar bajenn -
Pe zistresin stumm ma frazenn -
Gand ma virim ar hlotennou
Ha giz-orin ma gwerzennou.

X

Rag arabad eo 've gwelien,
Briz-vrezoneg ha leuhachou,
Gwall-heriaoueg ar skolachou,
O tarasa dour on eien.

Na brezoneg koz-beleien,
Briz-leoneg, gallegachou,
Dour benniget eet da welien,
Segal-winiz ha pellachou.

C'hoarzin 'hello 'walh ar helien
Gand ma zoniou: belbiachou,
Hag a-wechou koz-traouachou
'Hellont beza (prizacherien!)
Med arabatd 'lared gwelien.

XI

Bez' e weler 'ma levezon
Meur a yezig -ha petore!
Euz ped parrez! -war ma gorre:
Yez unvanieg eo, hervezon!

Rag d'unvani, sur zo ezomm
Diouz Skol-Vreizeg Per Honore
Da skol ouiezieg Roparz Hemon
Meur a skolid -ha petore!

'Vid 'n em glevoud kenetreizom
E tiskourrin 'giz o lore
Ar pengosou am goudore
(Vo dre reizenn ha dre rêzon!)
Med diskourra ken, emezon.

XII

'Vid pengosou on aheurtet
Gand o bodou, grit eun notenn.
Gwell e vefe m'o diskolfen
D'o eüna ma'z int tortet?

Euz ma gwella 'm-eus o zeurket,
Red' ve devi kef ha sklosenn
'Vid reizadur tud aheurtet??
- Gwell e kavan eur wall-notenn!

Forz pegement, tudou feuket,
E ve lopet war ma hloppenn,
Gwell e kavan eur wir glotenn
'Ged meuleudi ma henseurted:
Gand ma labour on aheurtet.

XIII

Setu aze gourhemennou
N'int a Zoue nag a wragez:
Deoh da voulla traou distlabez,
Din da ziwall em wriziennou.

C'hwi a raio diouz lezennou
Nevez-savet, re ar bloavez!
Me a heuillo gourhemennou
Ar Gonideg ha ma farrez!

Med a-zivoud gwellaennou
Reo na glaskin na digarez.
Aotrou Rener, gand trugarez,
Braz ma doujañs d'ho kelennoù
Gand ma gwella gourhemennou!

30 a viz Here-10 a viz-du 73.

KENTA LODENN

AR ZON GENTA

**RIMODELLOU
MIBILIACH**

Gouel ar beuz

Da zevez pardon sul ar beuz
— Va botou-lêr! Va boned ront!
« Ro din va bod, an taol vo pront! »
Na veze pres, na veze reuz...

E kerzem gren, gand heñchou treuz,
Bugale gae e oam o vond
D'overenn pardon sul ar beuz
Gand botou-lêr ha boned ront.

Bokedou lêz oa 'leiz ar hleuz
Ha leiz or penn gand kloh ar zon.
On daouarn gleb oa leun a frond
A lore glaz... Na keuz am-eus
D'ar mare neuze sul beuz...

Kerseenn

*« ... Et c'est ainsi que l'on va, que
l'on vit loin les uns des autres, et puis
un jour l'on s'aperçoit que là où il y
avait tant d'af-*

fection il n'y a plus qu'indifférence.»

Lizer ar hoar vihan d'he breur

braz, 22 a viz ebrel 49.

Hag o-daou deut braz...

Va hoar, lavaret mad am-boa,
Pa oam a-stroll hag oll er gêr
E vije eet ar puñs d'ar stêr
E vije eet da get or choa.

E vije eet d'an hesk or joa,
E vije eet da haou or gêr.
Va hoar, lavaret mad am-boa
Pa oam a-stroll hag oll er gêr...

Eo deut da wir a vloaz da vloa'
Ha gwirroh c'hoaz vo 'benn emberr.
N'ez om-ni ken bugale ger
An amzer gent. — Med pell a oa
Va hoar, lavaret mad am-boa.

choa: karantez a ziskouezer d'ar vugale, karantez etre bugale.

Ar feunteun-aour

*A oa anezi er garront don war hent ar
skol, e Gwezeg. Hirio "adlodenet"!...
Hag interet.*

Ne gaver mui ar Feunteun Aour
Er garront don, e leh m'eo bet
E bolz ar wern. — Oa aour he sked
Er hleuz pri-prad, ha glaz he glaour.

Gand simant griz eo greet he laour,
Er harrbont striz ez eo dour-red...
Ne gaver mui ar feunteun aour
Er galon don on-deus-ni bet!

Eur poullig heol oa rust e zaour
Oa hi d'ar houlz, dour lap war led. —
Dre gorzenn guz 'z a hi d'ar red
D'eur blomenn dir. — Or halon baour
Da betra eet he feunteun aour?

Ar Bugel-Mir

I

« Chomit amañ, a lare mamm,
C'hwil 'zibuno ar gudenn hloan,
Braoig aze da hortoz koan,
Keid ma vin-me oh ober stamm.»

Chom a reen gand muzell gamm,
Leun a gounnar ha braz va doan.—
« Konta 'rin deoh, a lare mamm,
Istor hennez e zaeig hloan.»

... Eet oah du-ze da hoari lamm,
Breudeur digar, d'ar waremm voan;
Me nemedon, paour-kêzig oan,
Jome du-mañ da zougen samm,
Sammig glahar ouz barlenn mamm.

— « Karet kement, ar mabig kêz,
Bugelig-mir hep tech na namm,
Ken n'e hased biskoaz er-mêz...
Nezet dezañ, ar mennig kêz,
Eur zae ken flour hag eon al lêz...
Med e vreudeur n'e gare tamm,
Tamm ne garent o breurig kêz...»
Trist e istor da baotr e vamm!

II

Lammou lañsuz e drein al lann,
Lorh e paotred ar waremm voan.—
Torchenn zoublig ha kudenn hloan,
Neh er bugel e zremmig splann.

... Gwerzet ganto da briz amann
Paotr an istor, ar hêzig kran.
Laeret ganto e zaeig kann,
Freillet dezañ e galon hlan...

Forz e leñvan, heb lared mann :
Breudeur digar, ne rafeh van
Daoust d'am daelou ha daoust d'am foan?
Che! na 'z afen ganeoh ahann
D'ober lammig e drein al lann!...

Daelou truez ar paotrig kêz
Zamme pounner e valvenn wan.
Drezo, bamet, e wele frêz
Skinou trelluz heoligoù kêz :
Tachou melen an armel-lêz...
Goude goustad e redent glan,
Tomm d'e chodou, ha 'kouezent fêz
Diouz e vuzell e-touez ar gloan...

Beradou tan e galon gêz
Gand istor drist e garig-nes.

20-22 a viz Gouere 1957

karig-nes: kar-nes (evid eur bugel).

Med dao oa mond d'ar skol en-dro

« — Med dao eo mond, va faour-kêz paotr!
Ya, mond en-dro d'ar skol eo dao.
'Ma leun ar harr ha stag ar jao :
Da choaz ho plas ni 'z ay a-raog.»

« — A gilometrou n'eus 'med nao
Ha muioh oa 'vid mond d'an aod...
Ha mond war droad ne vo ket dao...
Med dao eo mond, ma faour-kêz paotr!

Da loja di.— Na brao ho kopr :
E skol ar vourh e kaveh chao,
Oa hir an hent, alïez glao,
Ha boutou-koad ha heñchou saotr...
'Peus boutou-lêr, ma faour-kêz paotr!»

'N-oa boutou-lêr, ar paotrig paour
Ha dillad nevez dre o haod
Gand roched wenn a-ziaraog...
'N-oa dillad flamm, ar paotrig paour,
Lizerenn aour war dal e dog
Ha kiziou kêr ha neuziou kog...
Daoulagad 'n-oa ar paotrig paour
E-leiz o foull a zaelou skaot.

— dre o haod : dillad stenn evel traou ampezet ablamour n'int ket bet gwalhet c'hoaz.

Bez' oa 'valou leiz ma godell

Bez' oa 'valou leiz ma godell
Mellou mellou, ruz o fluskenn.—
Mellou daelou ouz peb malvenn
A luskellen o hwezigell!

Hag he hargent 'vel eur skudell,
Hag he zarzent 'vel eur glorenn,
An avalou 'leiz ma godell
Mellou mellou, ruz o fluskenn!

Bez' oa tanet gand ar ruzell
D'am daoulagad lez¹ o hrohenn.
Bez' oa kammet ma divuskenn
'Vel d'eur hlañvour gand e rohell.

Ha ma halon par d'am godell...

Prest da roga gand poan bugel,
Rag er werjez er houdorenn
'Stenne warnon hud he sugell,
Rag pellohig trem' ar grugell
E hrougouse eun durzunell...
Braz-daoulagad a zigoren
War teñzoriou ma oad-bugel
N'am-boa 'nezo 'med aluzenn.

lez o hrohenn : bord o hrohenn
divuskenn: diweuz
c'hwezigell: eur mell daeraouenn ront a-istribill.

Na leñvit ket...

« — Na leñvit ket, ma faour-kêz paotr
Avalou 'peus, avalou, del!...»
Ha veze dao, d'ar skol, da bell,
Dao mond en-dro e mod pe vod.»

D'ar mare mad 'vez kran ken yell
Ha kistin rouz e klor ar bod...
« Avalou 'peus, avalou, sell!...
Na leñvit ket, ma faour-kêz paotr!»

Ha tad ha mamm a ree flod
D'o faotrig ker gand mouezig skell :
« Kemerit pér ma kavit gwell! »
Med daoust d'ar pér — moarvad 'oa sod! —
E leñve c'hoaz ar paour-kêz paotr.

« An amzer 'z a da heul ar rod,
Vakañsou vo, ne vo ket pell,
An traou a jomo 'vel a-raog...»
Ha pok an tad oa tomm d'e chod,
Ha pok ar vamm a bade pell...
Med berr e oa o skiant-poell :
E ouien 'walh e flastr ar rod
Pep tra dindan, ne vez ket pell!

1949-1973

ober flod : mond chentil ha dousig d'eun bennaked. Ober dezañ geizou
karantezuz. Evid touella, trompla
skell : eur vouez sklêr ha dousig, evel hini eur plahig; mouezig flour

D'ar houlz ma vez a-hed ar bod

D'ar houlz ma vez e beg ar bod
Avalou ruz ha kraoñ ken yell,
E veze red, d'ar skol, da bell,
Red mond en-dro e mod pe vod.

—« Na leñvit ket p'ho-peus ho lod
Ha 'leiz ho tok kement a hell!...»
Eul lodenn ken Ha beh ar bod
Avalou ruz ha kraoñ ken yell...

Er spern zoken oa ruz an hog!
Ken rankluz all ha feulz ma zell
E kavin berr ganin an tell
Ha gand ma zud re biz o skod
E-skoaz d'ar bern oa beh ar bod.

E-skoaz d'an hañv e barr e hell :
Diouz dero braz da askol-aod
E strewe méz ha had ha pell
Ha kistin rouz ha kraoñ ken yell...
Ar paotrig kêz a'z ee trell
Gand profou laosk an hañv 'n e glod.
« — Avalou 'peus, avalou sell! »—
Gand pemp pe hweh oa leun ma zok!

Miz Here 49- miz Here 73

hog: hogan
tell: lodenn dleet d'ar Stad pe d'ar perhem war beb marhadourez.

Ar paotrig goer

Eur paotrig lent e penn al leur,
E-unan kêz e dilerh kant,
Gand bleo 'n o led eo rik o ant
Ha dillad striz eo yen o feur.

Daoulagad gleb ha digor frank,
Daoulagad ront ha feulz o skleur...—
'N e zav a jom a-hed an eur,
A-harp er peul e gorvig lank.

Da veg e droad 'n-eus afer veur :
Emañ da vad o turia fank!—
E lezoh aze beteg peur,
Ar bugel goer, bugale drant?

A beb an eur, ha tamm ha tamm,
E sav da doull e houzoug kleur
Ha bouillenn dreñk e heugou stank.—
E zellou feulz a drell o skleur...

Ha dond a ray pe gar pe vreur?
— « Pe hano 'peus? » — E larfe : « Yann ».
— « Ha c'hoari rit? » ... E larfe : « Nann! »...
Eo nevez deut d'ar skolaj meur
Ar paotrig kêz e penn al leur.

Ha stard e sank e dreid er fank.

Ha tamm ha tamm e wask, e sank,
E lonk e heug a beb an eur...

Ha tamm ha tamm e wask, e sank,
E lonk e heug a beb an eur...
- A-greiz pep kreiz, eur gaoz : « Tu pleures? »...
Med trumm ha taer e tiroh : « nann! »
Ha rok e stenn e gorvig lank.

Med beg e droad a gren er fank...

1952-1953

goer : lent ha spontig, kizidig
feur : dillad striz ha ditir.

Gwechall er skol o c'hoari barr

Gwechall er skol o c'hoari "barr"
Dezañ an hini 'kasen "pare"
Hag e karen hag am hare
Ha par on-daou 'vel daou vi yar!

On daoulin ruz ha noaz or garr
Oa or chodou tomm d'ar mare.—
Gwechall er skol o c'hoari "barr"
Din an hini ' kase "pare :

Ma dorn d'e zorn hep ket a var :
« Touchit, Ifig », a lavare.—
War or chodou tan a bare.—
E bragou berr ha soñjou par
E porz ar skol o c'hoari "barr"...

"barr" : galleg "barres"

.....
... Hag e gavet 'm-eus adarre
Hag e gavan beb a vare
War benn ma hent, ar mignon ker.—
Med ne ra van, med ne lar ger :
Oar koulskoude mad ma doare!

Med keid-all zo n'on bet 'n e zerr!...
Hag an amzer on dispere,
Sed ne ran van, ne laran ger
Daoust ma ouzon mad e zoare!

Tan or chodou a hlouare...
N'emom ket ken e bragou berr,
On daouarn gwaz ne zant ket herr :
Piou om bremañ? — N'ouzom dare...

Hellenn

Briz vugale en em laeret diouz o hêriou
Drant e kerzem war or pouezig trem' maneriou :
Toennou muget 'kreiz ar hlazvez trema Hellenn.
Ha miz even e levez 'lede pallenn
E hlaziennou 'dan or seuliou oa diarahen.
Euz ar bodou e tivere mél 'n or herhenn,
Ar gwez haleg en eur vralla skeud o begou
A luskelle o briz-heolig war on dremmou.

Er yeot-mellou, reud ha bleudeg, flour d'or glinou
E taskrene on divêsker, hag e skinou
Heol ar mintin e taskrene 'hed ar grinenn
Neudenn-wennig ken kevrinuz ar gevridenn.
Briz vugale dishualet a lezennou
Drant e kerzem war or pouezig 'n he chadennou
Hag e trelle deom or zellou trema Hellenn :
Toennou muget du-mañ du-hont : e lugernent.

Hag on strewent, hanter-vezvet, en trevadou
'Dreuz ar melchon hag ar holzah hag an edou,
Ken gwall vroudet m'oa or halon gand he froudenn:
Ya, burzudou, sur, oa du-ze, digavandenn,
Traou souezuz, den d'o gweloud, den da berhenn
Nemed Doue ha nemedom — ken diarahen!
Frêz e welem dre ma kerzem, dreist ar glouedou
Toennou Hellen pelloh-pella o zouellou.
Sed avarem, koz bugale, war maneriou...
Ha 'n eur redeg e tistroem tre d'or hêriou!

Feulz hag iskiz ato 'skedont 'giz kenkizou
Trem' ar pellder, tier, krevier, lochou Hellenn
Pa sko warno heol ar beure -- koz toennou!

Hag abaoe emaint ato 'kreiz va goulou
Hag e leuhont, gand melkoni, dre va zoñjou :
Che! ma karjen beza kerzet, tra ma hellen
Em yaouankiz, kavet 'bijen gwir genkizou
E-leh hirio tier, krevier, lochou Hellenn!

N'on bet morse, p'oan krouadur, beteg Hellenn
Ha koulskoude 'vid 'bez freuzet ar "gwir vadou"
'Vid an edou, 'vid ar holzah, 'vid ar melchon,
Am-boá tapet ("me da zesko") ar villastrenn!
Ha koulskoude, daoust abaoe 'm-eus greet roudenn
On-me techet da ziheñcha gand c'hoantadou...
Med en aner reont sinadou war-du Hellenn :
On bet desket da ziskredi war seurt madou!

Pask 56-57.

ar villastrenn : ar skourjez, ar fouet. "Martinet" e galleg.

N'eo ket Padrig va gwir hano

Ya me larfe 'walh va hano,
A be barrez on ginidig,
Neiz va halon - baradozig! -
N'eo ket Padrig e oan eno.

Yez ha yehed 'm-eus ahano,
Eienn lignez, ti reuzeudig :
Uhel savet war or meno
N'om na brudet na pinvidig.

Aon am-eus-me gand nebeudig :
Re a vefe gand va hano.

Mor va halon, chal he lano,
O tifrual he guzulig,
Unton gantañ son e vuzik...
Gouzoud ouzoh, skouarn dano,
N'eo ket Padrig va gwir hano!

Gouez ez on-me. Med divergont
Taer ha faeüz tud zo 'nezo :
'Z aint da flêpad on direzon
On-me difonn ha diheson.
Darn a varno, darn a flano,
Amañ, a-hont, ato kano
Pik pe vranig, hemañ, henhont.
Allaz! din-me jod a dano :
Bouzar vin-me ouz ma hano

Goap a rafent, gouzoud ouzon.
Ouzon ivez 'vent diskredig,
E lavarfent : « Sell, an Ifig
Zo anezañ seurt kizidig?... »
Eh abaffen gand va halon,
Gand ar gwirra 'z eus ahanon!

Kuzet 'bije va zoñjezon,
Enkreiz, kerse - 'vel va hano -
Morse 'bije roet donezon,
Prof na kinnig, lod ar pardon
Euz va ene, gand ar spouron
Rag an hu a zavfent warno...

Sur e rajent, ha dirazon,
Ya ma ouzfent piou zo "hanon!"

Kaer am-befe, ouzfoh hano
Em barzoneg, va zoñjezon,
Med pa ouiot diouz levezon
Piou pe betra zo ahanon,
En han' Doue (r'am fardono!)
Ra vo Padrig va gwir hano.

1960

difrual : difronka, leñva a-stroñsadou
flepat : konta dre souch-ha-mouch, diskuill d'an oll.
flana : lubana, teurel kaol d'eun benanked evid plijoud.

EIL LODENN

AN EIL SON

**RIMODELLOU
BARADOZ AN DOUAR**

AN NEVEZ-AMZER

RIMODELL AR GOUKOUG

Va hoar -
Pa gano-hi da Bask, c'hwi oar... Kan...
— Er stankenn hlaz da gala-mae
D'he heul, an drask a gano gae
D'ar beure yen pa deuz al loar. —

... Vo klask d'ar bleoñ... Ni 'z ay d'o foar!
Ha gouel d'an heol e toull pep kae.
Pa gano-hi vo plan, c'hwi oar,
Er stankenn hlaz, da gala-mae!

Er pradou druz e-kreiz o gloar
Vo flour ar yeot da lez ho sae;
Ni 'z ay da glask bokedou glae
A zev 'n o zav 'vel goulou koar,
Pa gano-hi da Bask, c'hwi oar!

... ha diskan

Pa gano-hi da Bask? — Pez kaer!
Dao vo hada 'valou-douar!
Hir an ero, pell an dalar...
Ha dao dre heg ma n'eo dre gaer.

Nag imor fall 'n or halon daer!
Larim neuze : « Pa vo mouar! »
Pa gano-hi da Bask, pezh kaer :
Dao vo hada 'valou-douar!

Ar spernenn-wenn a vo 'n he haer
Med or glinou leun a zouar,
C'hwez an teil en avel glouar
A deuy d'or heul war-nij en êr —
Pa gano-hi da Bask ken kaer!...

plan: plijadur dre vraz. Ni on-eus bet plan : plijadur on-eus bet

NEVEZ AMZER

Luskeudennou

I

An heolienn zin
Da houlou-deiz
A gren a-dreist
Ar vorenn grin.

Ha liou al lin
Ha flourig seiz
Zo war an hin
Da houlou-deiz.

Ha blaziou tin
A zav a-greiz
Ar prajou leiz
A-dal ma skin
An heolienn zin.

II

En hinon flour
Ar bannou heol
A leugn he geol
D'ar garront doun.

Ar poullad dour
'Deus leiz e veol,
Ar waz a zourr
Gand red an heol.

E sked a vourr
War kloer an teol,
Ha troiou-heol
A zoug e-skourr
Heoligou flour.

III

Sklerijenn buill
An heol a darz
Dre doull ar harz
Er hlazvez fuill.

Ha ruill-diruill
E strink e-barz
Eur mellad duill
Sêzennou marz.

Foenennou druill —
Menoziou barz,
Traouigou arz! —
D'o zro a skuill
Sklerijenn fuill.

1958

TROIADENN MIZ EBREL

I

— « Bugale, m'ho kwelan er prad!
Ma kavan er yeot ho skasou,
Fregaset ar foenn a-blasou :
Leusk hardiz! 'Po kerse d'ho stad...

« Gourdrouzal a ray hoh êl-mad
Ma tehit diouz hent e hrasou —
Rag pehed eo bale er prad :
Gand diaouled ez ay ho skasou.

« Hag amañ e kavoh ho tad :
E welim vo gleb ho poutou,
E klevim gand gwrez ho korvou
C'hwez eston miz ebrel 'n e vad...
Ken speguz c'hwez kegid ar prad! »

II

— « O leusk hardiz! Ni ziwallo :
Gand peb dornig beb a votez.—
Ma'z eus pehed vo da goves,
N'eo ket boutou on tamallo!

« Chê! 'n oll êlez, trist, 'n em jalo
'Dreñv ar glêdou? — Hel lavarez!
Ma'z eus diaouled, eo divalo
Kaoud anezo 'kreiz or parrez!

Koz sorhennou! Den n'or gwelo...—

Mad e klevom trouz ar holvez,
Er ster-walhi zo gwalherez:
N'eo ket pikez on diskuillo.—
O leusk hardiz! Ni ziwallo!...»

III

Bez' oam war aon, bez' oam dre laer,
O vond da foar ar bokedou,
D'ar yaou, dre hlazenn ar pradou
Gand ode hlaz an nadoz-êr.

A-guz dre greiz eun trouhad kaer,
D'ar red war weled d'ar glêdou;
Ez êm war aon, ez êm dre laer,
Da bell, da bark ar bokedou.

Er hlizenn wenn eun ale sklêr
Damalle deom or hammedou;
Er foenn oa frêz on fehedou:
E rênt d'on heul eur roudenn naer...
Ha 'z êm war aon, ha 'z êm dre laer!

IV

Pegen marzuz pehed marvel
Seurt yaouveziou! — Piz zelaouem
'N oll goukouged krog d'on gervel:
Droug-speredou ve ken laouen?

O hrougousad, eun durzunell
Groñs hourdrouze, 'vel eur gaouenn :
'Ve an êlez ken spont-bugel?
'Ve ken raouliet o hanaouenn?

Ouz heoledi er yeot izel
E flammine mil louzaouenn :
Gand sklerijenn ho koulaouenn,
Tommheoligou, bleoñ dimezell,
'Z êr d'an ivern da viz ebrel?

V

Geiz lapoused leiz ar stankenn,
Amouroused flour o zouell :
Petra larent 'n o rimodell?
N'ouiem dare joa pe anken?

Luh eun askell diouz peb brankenn,
E tiboufent, 'n eur mouch avel,
Tre dirazom, ha 'n em zouchent
Tre ken souden en eur devel!

Med er waremm eun harzadenn,
Med er garrhent eur garrigell :
Ouz ar mouilhi oam-ni heñvel,
Tre ker buan, 'n eur zoubladenn,
'Touesk ar hegid en em vugem!

VI

Speg 'n or hrohenh c'hwez ar hegid,
Red 'ta distrei bred-abredig,
Deut d'ar voused aon reuzeudig,
Beh d'on diouharr gwisk al lehid.

Heg rasaille deom ar gegin,
Goap rasaille pok-ar-hoadig;
Speg 'n on dillad c'hwez ar hegid,
Herr ar strillad 'benn-ermberrig.

Bilou reem gand ar vilfid :

Grêt or pehed, hag amgredig
Stad on distro — peuz-goustadig!...
Koun on droiad ken dihounid
Speg 'n on ene blaz he hegid.

VII

Chê! Va Doue, Tad pinvidig,
'Touez ho tanvez a bourvezit
Ken a leton, ken a lehid,
Pa vo echu he zroiadig,

'Z ay davedoh, tra gizidig,
Hi a vroude kreiz or brennid;
'Z ay dirazoh, ar paour-kêzig,
Hi, on ene, a bourvezit.

Petra ganti vo da ginnig
Nemed warni c'hwez ar hegid!
Grêt he zroiad 'nez eur gounid?
Bod na boked na bokedig
Euz ho cherdin, Mestr pinvidig?...

1956-1957



KALA-MAE

Reo a ziver diouz ar herez,
Gwenn ha tener. Seo ar broñsou
Beo-buhezeg er penngosou
Fenn o frondou, kreñv ha nevez,
E goerez.

Heol hag êzenn, meo ha mevez,
Dreo o c'hoari, 'garg a billou
Neo ar foziou gand bleoñ kerez
Hag a floura kreñv an deliou;
Luskellerez.

Streo er gwasked, askell-êlez
Zav o hellid, teo o begou;
Kreiz o zoullad, keoiad spegou,
Eo e tiskenn a bimpavez
Dre gaouadou, bleoñ ar herez :
Ginivelez.

'Vel er bodou, seo zo ivez,
Kleo 'ta paotrig, 'leiz da jodou;
'Leiz da galon, keo 'garantez,
Dreo he hasenn, verv ar vuhez,
Hag e loska yeo ar furnez. —
Meo out ivez gand da hoantou!
Sant o pignad seo ar hignez
(Eo 'ta, paotrig!) gand da jodou :
Amzer-nevez.

'Vel ar bodou beo out ivez,
Teo da vorzed, kreñv da bokou,
Puill da bennad bleo garlantez,
Beo-buhezeg, 'vel eur werjez,
Eo da gorvig — ken ma virvez...
Dreo 'mañ warnout stumm da baskou.

—
Gand ma pado eo, e ampez,
Reo ar hlanded, liou ha frondou
Bleoñ ar herez.

Miz Mae 1957

KOULZ AR GOANTIRI

'Hed ar girzier, na soniri
'Giz ma vije ar bisigou
Ouz ar bizier kleierigou,
Badeziantou gand pep hini... —
Strobinellou!

Ar rouziged hag ar mouilhi
Pennglaouiged gleb er gludou
Skiltr er girzier o haniri
Ken ma tride ar bisigou
Dreist ar hili.

'Giz ma wigour rodou kirri,
Ar boh-ruzig gand e glemmou;
Gand ar pintig e gantikou,
Pich eur stivell war ar bili. —
Hud ar girzier, poan ha dudi,
Ha koantiri.

Pa oa 'hanom bugaligou,
Stok or pennou, krog o c'hoari,
Pebez birvill gand or homzou,
'Vel gand evned al liorzou...
'Zave 'wechou trouz fachiri,
Lintre daelou, skrije leñvou,
Tintent sklintin 'vel braoigou
Pa ziruellont gand eun diri. —
Eledigou!

Bez' 'z eus ato bugaligou,
Sard er perzier o safari...
(Pitill ato er mintinou
'Leiz ar girzier geiz an neizou!)

Bez' 'mañ ganto or cholori,
Bez' 'mañ ganto or honchennou. —
Me daveto gand lipigou :
Int dinijal 'vel an dridi!...
— Lamponidi!

Miz Mae - miz Even 1957

AN HANV

HANV

Troiadenn miz Gouere

I

Diouz Kêr-Hellenn d'ar Feunteuniou
Goueliou trelluz, troenn ha lidou
Kreiz ar vroënneg, flamm tantadou
Gand ar banal dre ar yeuniou.

Ledet lisiou hed ar stèriou,
Douget banniel gand ar bodou :
Diouz Kêr-Hellenn d'ar Feunteuniou
Eston pardon ar bokedou!

Klod er hleuziou 'giz aoteriou,
Spled dirazo gand ar glêdou,
Lañs an heol 'n o gwerzidou.
Gorreou atô hed an euriou
Diouz Kêr-Hellenn d'ar Feunteuniou!

II

Bodet eno 'n eun ilizad,
Lod daoulinet 'vel o pedi,
Lod azezet o voredi
'Vel maouezed war zaouzanad,

Marsigoded ruz o strollad
Tud a noblañs o saludi,
Hailleboded rog ar boblad,
Tud a Iliz o lugudi...
Oll emedont, trell d'or zellad,
Stouet devod, oll o pledi
Ouz gras Doue ha 'n e veli

Or bokedou, klok o gwiskad,
Oh azeuli 'n eun ilizad.

III

E tilammem par da laeron
E baradoz kaer ar banal
A oa gantañ c'hwez ar jenal.—
O diskourrem rust ha mahom!

Ha ken rankluz mall or halon,
Ha ken sammet beh or manal
Ma foranem — fallad laeron! —
A-zornadou, aour ar banal.

A-daol souden 'save spouron
'N or houstiañs : pud d'on anal
Or briadou; yen ha teñval
Ar baradoz, e zonezon...
Hag e tehem, par da laeron.

IV

Na rede yen er yeun an dour!
Tomm a rede 'n or gwazied
Gwad or halon drevariet
Gand avi rust da vleuniou flour;

Bleuniennou foeon gand deliou pour,
Eonenn wenn ha dishiliet
Al lostou-kaz, ha loaïou-dour
Ledet plên er poull margiet.

Na foeste yen al lagenn vourr!
Yenig ivez d'or bizied
Korz ar bleuniou ken aviet...
Ha drammet stard 'n on divreh gour
D'or grubuill domm na yen o dour!

V

War ol lerh-ni, oll int chomet
Bleñ on amzer, lod on hanvad,
Druz o vera 'n or brusk tanet,
Mel ha dienn gand peb lommad.

Or briadou bleñ mahomet,
Seiz ha lien, blevenn dañvad,
Bet peurgollet gand eun tañvad!
— Tre on divreh bet ken tommet!

Beb an nebeud, 'benn eur momed,
Bod ha bodig, int bet stranet
Heb eun damant, eun huanad,
Goude ganto bet ken fromet!
Kreiz on heñchou, oll int chomet...

VI

Da foenn int eet en heñchou braz
Or bleuniou hañv 'oa fresk ha beo,
Da gañv o liou, da hesk o zeo,
Ar brulu bresk, al lostou-kaz.

Tanfoeltret rah er poultrenn graz,
Ar foeonenn vistr, an elestr teo,
Da foenn ez a o deliou glaz,
Da reh ez a or fouge dreo.

'N or genou c'hoaz emañ o blaz,
Emañ o hwez e-touez or bleo.—
War-lerh or freuz a-dreuz an treo,
Emañ or zoñj e fest ar vaz :
Da get eo eet or hestou braz!

VII

A-liou d'al laez, a-liou d'ar gwad,
 Emaint a-streo a-hed on hent,
 Or bleuniou hañv, or c'hoantou kent :
 Er bouldrenn skañv e ber o zroad.

A-liou d'an tan, a-liou d'an oabl,
 Pe hloanach flour, pe voulouz lenkr,
 A-liou d'al laez, a-liou d'ar gwad
 Emaint war-led a-hed o ment.

Or joaiou kêz, pe wir pe hoap —
 Ha lod oa dous, ha lod oa treñk! —
 Or joaiou taer, or joaiou lent,
 Emaint a-dreñv a-hed on oad,
 Beradou lêz, beradou gwad!

Miz Even - miz Gouere 1957

HANV

Eur vodenn veuz e-tal ar porz
 Ha gwrez an hañv ha blaz ar plouz...
 Na c'hoant na soñj, na fiñv na trouz :
 E-kreiz an deiz eürusted morz!

Anoued ar beuz war gwrez va horv
 Ha pok an heol d'ar bouldrenn louz. —
 Eur vodenn veuz e-tal ar porz
 Ha gwrez an hañv ha blaz ar plouz...

Pellachou kraz e-kreiz ar porz,
 Eur yarig wenn, eur yarig rouz,
 O hlohad groñs el leton touz...
 Da greiz an hañv eürusted morz,
 Gand gwenan dreo o fraoñval ouz
 Ar vodenn veuz e-tal ar porz.

Ne ouien ket (ne rên ket forz!)
 Pe glahar 'm-oa, petramant joa!
 Na vije bet na bah na horz
 D'an zenna kuit. — Ne rên ket forz :
 Eur vodenn veuz e-giz eun dorz
 Ha samm va horv an hini oa...
 Ne ouien ket (ne rên ket forz!)
 Pe glahar 'm-oa petramant joa.

Med siwaz din! siwaz, penoñz
 E par ken frêz eun eurvez poud?
 E leuh an eur-ze dre va zoñj?
 Ha gand pe joa ha gand pe vroud,
 Pe geuz zoken, d'ar poent pe zoñj
 Deus grêt he merk a-dreuz va roud?...
 Ar wech hepken — ha forz penoñz —
 On bet ez-veo eur veuzenn boud.

KOULZ AR FALTAZI

"C'hwi a jomo aze da ziwall an ti"

Morailloù, potailloù, dor goz...
A! Mammig! nag ouzoh 'm-oa kas :
An heol dre doullig ar haz!
An alhwez e chakot ho proz!

Er jerdin oa bleuniet ar roz,
Er prenest an oabl a oa glaz.—
Morailloù, potailloù, dor goz,
Mogerioù, nag ouzoh 'm-oa kas!

Er mêzioù oa bleunioù er foz,
Avelioù oa nevez o blaz
Hag eostou poultrennet ha kraz...
Hoh houarn a vloñse va boz,
Morailloù, potailloù, dor goz!

Sklerijenn ho treuzioù mein glaz
En antre a hloaze va noz.
Ar voger oa teñval he raz;
Padal war an treuzioù mein glaz
E pare an heol 'n e vraz...
Dor antre, na ganas da hroz
Pa skubez d'an treuzioù mein glaz
Va hañvad dirazout a-boz.

Pell 'zo int digoret, siwaz!
An dorioù a brenne ken kloz,
Ha redet am-eus-me, paour-raz,
Da glask va flijadur... allaz :
An avel eo goular he blaz,
Ar jerdin eo gweñvet he roz...
Pell 'zo eo distanet, siwaz,
Va hañvad a horez, dor gloz!

Amzer Arne

I

An devez-hañv e barr e vrud
Hed ar menez 'led e ludu.
Kuch ar pin ha korz ar brulu
Eo sonn o fez en amzer lug.

An oabl zo sonn war reun ar brug;
Lein ar menez 'hourvez lugud :
An devez-hañv e chalm e hud
War va ene strev e ludu...

An heol a bok da veg ar grug;
Plas-ar-Horn ha Menez-Krulu
'Skrij o bronnou ken diskurlu :
An devez-hañv war wrez o rud,
Devuz devuz strev e ludu...

II

Feulz ha didrouz, stenn o plava,
Eur sparfell rouz a stign e wall
E barr an oabl, heb loh na brall,
'Uz d'an dorgenn krog o vorza.

Kriz ha ganas, 'mañ 'n e vrava,
Êrouant mud an drougou dall.
'Dreuz an heol, a-zalh, o plava,
Ar sparfell rouz a zoug ar gwall.

Korv hag ene, 'mout o fêza
Gand tommder voug an eurvez fall.—
Ha plava 'ra eur sparfell all :
Sav, va spered, poent eo loha,
'Mañ ar pehed krog o plava.

GWRAH-AN-HANV

(gweledigez!)...

War berz an eost eur barrad glao
E-giz al lêz a-dreuz ar zil
A daol e zour. — Ha 'giz eur c'hwil
E fraoñv e lañs en edou aho.

Ar pennou-ed a skrij 'n o zao
E-keid ma taol, ma taol a-bil,
Ha beh e nerz, ar barrad glao,
E-giz al lêz a-dreuz ar zil.

A-greiz ar hoabr eun heolig mao
A bar 'n eun taol; ar glao a gil,
Endra ma sked el lastez vil
Ha 'tousez an ed ha reud atao
E ruzder feulz d'eur boked flao.

*

**

Ha tre ken trumm, en eost a-rez
Na trouz na trid : a dal da gil
'Mañ troet e stal, ha skoet 'n o fez
An edou gleb ha deil ar gwez.
Beradou strink 'zo 'skign en drez,
Greunigou drant dre gand ha mil :
Ouz Gwrah-an-Hañv e boem he lez
Emaint a-herz e berz o hil...

*

**

An edou gleb ha deil ar gwez
'Zo nevez-gwerh war-lerh ar glao,
Beveet o stal ha chalmet-glez :
E luh an heol ha fuc'h e wrez
'Mañ Gwrah-an-hañv o nah he hrez,
'N he hoazez 'mañ ha noaz 'n he brao,
He sellou dour a drell en drez
Ha sourral 'ra en douriou-sao...

1960

AN DISKAR-AMZER

GWENGOLO

Dija eo deut an noz, dija eo eet an deiz!
Koulskoude, er mintin-mañ, ne zave ket ar gliz
Ha tamall a reen-me d'an heol e houlou briz :
« Hag-eñ e tov va drask? Bremaig ez in d'he neiz.»

Dija emaon er gêr! Ar skol zo echu reiz!
Koulskoude, en tri-miz-mañ, n'echue ket ar miz!
— Dija 'mañ prest ar skol! Vakañsou dav o geiz!
Koulskoude, d'an diweza, paour-kêz, o honten piz!

Dija 'mañ kuit va brud? Va roud a dro da gleiz?
Koulskoude, e laren-me : na 'z afe hi gand tiz!
Didalvez an devez-mañ, warhoaz en-do e briz...
Na pelloh vefen braz! Na joaiou vo e-leiz!
Na pelloh fin d'an noz! Na pelloh teufe deiz!

Ha setu deut (Dija!) va buhez en he hreiz,
Ha bremañ, e laran-me : na 'z afe hi 'n he hiz!
Koulskoude, ma errufe, e kavfen 'vel ma ris
An drask o nijal kuit, ha vi ebed en neiz...

20-9-1955

AVALOU AR GER

An dousi-rezineg, an dousi-normaṇdi
Melenet ha livrin er bodou dizeliet
Eo trehuz o frondou er werjez briz-heoliet
Ha trehet eo ganto da galon o heugi.

Med siwaz! Er prenest e chomez da nehi? —
Da bakad zo aozet, da zahig zo leuniet,
Ha dousi-rezineg ha dousi-normaṇdi
Ken livrin zo enno, er hreziou, sebeliet.

Youenna, an orloj a glevez o seni?—
Distrei 'rez er prenest da zremmig ankeniet;
Da henou zo mudet, da zellou zo glebiet :
Gand petra e chomez a-zao da zaouzani? —
Gand dousi-rezineg? gand dousi-normaṇdi?

Leiz da zahig 'peus avalou,
Va haredig... re anezo!
Med leusk hardi! dalh mad dezo,
Daoust m'eo gwallon seurt sinadou.

Treñ da zeg eur!... Ha billedou
Zo da gemer! — Ken a vezo!
Leiz da zahig 'peus avalou,
Va haredig, re anezo...

Euz da galon int gwall gelou,
'Hann da Bariz hi a freuzo :
Da valvennou zo eet mezo
'N eur zivralla samm o daelou :
'Leiz da zahig zo sinadou!

Ha henoz vo unan 'n he frenest o nehi,
O trei ouz an teñval he dremmig distronket
D'adweloud dre varzoñj ar werjez briz-heoliet,
O keuzia d'or porzig — ha Pariz dirazi!

Ha henoz vo unan, darempred 'bed dezi,
He-unan 'n he hambrig, e Pariz strafuillet.—
Med livrin ha tostig, avalou vo staliet
Ha leuho eviti e Pariz o skedi...

Ha henoz eur verhig, paour-kêzig anezi,
Dianket e Pariz orgeduz ha killet,
A leñvo goustadig, — med eno vo beillet
Gand frond or harantez ha lod on domani,
Gand dousi-rezineg ha dousi-normaṇdi.

TREN MIZ HERE

*... En souvenir de toutes nos rentrées d'octobre,
de vieux départs de tous les bords, de vieux au revoir,
de vieilles larmes,
de ceux qui tels s'en allèrent et tels ne sont pas revenus...
Et pour la désolation de ceux qui ont cru rester.*

I

Emañ o krozal treñ miz here,
War-du ar viz, e-mêz ar vro;
O teuria feuls diouz traoñ da gorre
E term, e hartm, e roh, e sko.

Emañ o tehoud kuit alese,
Diouz tu pe du, war lez ar vro,
Ha hejal 'ra e-giz ma tere
Mouchouer gwenn e êzenn-dro.

Difronkou, pokou - ha petore! -
A gas 'n e lañs e-mêz or bro,
Karantez koz a gas da beñse
N'eo deut biskoaz, biskoaz en-dro.

Na zoñjou 'zo gand treñ miz here,
Kredennou foll ha c'hoantou go!
Storloka 'ra gand beh e charre,
D'o has da goll e hast a-fo.

II

War-lerh e freuz, a droh an ene,
Ar heuziou koz a jom er vro...
War-raog, e treuz, a-droh o ere,
Ar hleuziou puill a dro-war-dro.

Ouz deliou melen gwez miz here,
E speg, 'n e giz, ha blin 'n em ro
Mogidell reh ha hirnêz kerse
Dre hlebor tomm an daelou zo.

Dre hlebor briz ha yen ar beure,
E sav er vann, a-uz d'ar vro,
Mogedenn deo ha trouz e fouge
Gand mall an dud d'ar pezh a vo.

Dre bark pe brad, e memez doare,
A-stlej, e kouez war boemm ar vro
Latarenn vresk hag eon pep huñvre,
Ha teuzi 'reont en avel-dro.

III

Na skrijuz klevoud treñ miz here
O yudal kriz e peoh ar vro!
Na bleñjal ra e miserere
O nah gand kas or henavo!

Ne vezo morse ken miz gouere
Na distro morse vo d'ar vro;
Ne leñvo ken an hini leñve,
Ne dalv ket soñjal, kaer or-bo...

An Amzer 'n hini eo, emeve,
Ne zale ket an hini zo.
Ha hopal rafen? — Tra amzere;
Biskoaz marh du na glevas ho!
An Amzer, ya, eo treñ miz here :
Ar gêr 'z a gantañ da bell-vro,
Ar bloaz 'z a gantañ da warlene,
Ha deh 'z a gantañ da bell 'zo.

IV

Ra yeno 'ta ar pok a zeve,
Diouz pokou all na troket vo!
Ne harzo tra ouz treñ miz here:
E sach d'e heul re oll ar vro...

1957

AR PARDAEZ

Klouarraet eo an deiz hag an êr a zo moug...
Eun houperig a houb he hlemmig en he goug
Hag he hantik a zoug pe anken pe hirêz...
Eun dumporell 'z a reiz gand an traoñ en hent-daez
Hag an heol 'z a d'e neiz er houmoul e-giz stoup.

Na sioullaad ra ar bed gand an oabl a zo moug!—
Un' bennag en eur vond a lar din : «... ar pardaez!»
Ha kerkent, a-daol-spont, e kouez samm war va chouk :
Eur wênn-struz, diouz he hed, a zav sounn war al laez.

E skleur ruz ar huz-heol ez eo du he feul-kroug
Hag he skeud o hirraad a zeu tre d'an diraez...
Teñvallaad ra ar foz hag ar hleuz a zo moug
Ha dre-oll e sav euz e gouyenn ar pardaez,

Rag e geol an hent doun e ra founn an noz droug.

Sell! an heol hag a zoub er houmoul a zo bouk,
An dumporell zo eet en a-raog en hent-daez,
An houperig a voug gand pistig he hiraetz
Ha va zoñj zo tristaet gand an noz war va chouk :
Distronka ra an deiz ha va dremm a zo moug.—

— War benn-hent da va roud, koz Ankou, e tostaetz
Ha da vale zo reiz e goulou ar pardaez.

1949

HANVIG AR ROZERA

Hañvig heoliet ar Rozera
Flour d'an deliou o veleni,
Skrij 'n e vannou eur spontadenn :
Trefn miz-here o pellaad
Diouz on neiziou zo kasaet...

Gand dassonenn e yudadenn
Chom ar vroad da zaouzani.
Douster hañvig ar Rozera,
Flour d'an deliou o voredi,
Ro dousijenn eun disterra
Tristig, tristig, d'he melkoni...

'Kreiz an tirien stou ar raden,
Krog an amzer o yennaad
Hag ar hoadou zo yellaet.
Daoust da hañvig ar Rozera,
'Tre an deliou oh heoledi,
Skrij en avel eur spontadenn :
Trefn miz-here o pellaad
Hag an amzer zo yennaet...

Gliz ar bodou o tivera,
Yen d'an deliou o veleni,
Chom saouzanet da luhedi
War avalou ankounaet :
Kañvig heoliet ar Rozera
D'ar vugale o kuitaad...
D'ar gwennili 'deus kuitaet...

1949

AR GOANV

AN EUR VUD

Doaniuz 'vez du-mañ or stal hag or bale er goañv.
Doaniuz dreist-oll an eur vud gand he hud hag he c'hwez!
Goular hag heuguz ar vaoz er zerr-noz a zo gouez,
Klañvuz an eur-ze ha tenn, hag or fenn a 'z a klañv.

Trouz eun draillerez eo frêz hag hirêzuz he fraoñv;
Tud dre ar perzier, pellohig, eo stohet o mouez.
Espar he dalmad e latar glaharuz ar goañv :
Warni ar peoh a ra lamm hag e zamm a ra pouez.

Izel an oabl war or hein ha peurvreinet an hañv :
Staguz eur vorenn a blad dre ar prad, hag er strouez
Teuziou dihouget a speg ouz relegou ar gwez...
Kañvuz an oabl hag ar glen, ha peb den a zoug kañv,
Mantret e zoñjou ha barnet da garnel ar goañv.

Daoust na 'z eus leh ebed ken da levenez ar bed?
Leh d'eur steredenn en oabl ha d'ar joa en or hreiz?
- Glebor an noziou a zav hag an avel 'zo gleb...
Glebet eo ivez ha yen e dienez o bed
Daouarn va mamm ha va zad gand krogadou ar red!
Sac"het ha mahet or stad e tonkadur ar geiz!
Chê! N'on-deus leh ebed ken e levenez ar bed :
Deut eo an noz war or heuz hag he euz 'zo 'n or hreiz.

Med eur goulouig er hraou a houlaou en on touez,
Izel e gelh war ar hel, hag e stel a zo skañv.—
Beuhed a heugn hag a gren e levenez o gwrez,
Skleur ar goulouig er hraou war enaou en o zouez
'Sked hag a drid hag a red e mopedenn o hwez;
Blevenn o hein a zo flour hag he chour a zo doñv;
Plouz dre o gouzer a leuh, hag e leuh en e douez
Stered a ver diouz ar hel - ha d'or gwel ez int skañv...

DIWAR AR PONT-MÊN... KASENN-GOANV AR STER-AON

*« Nous voguons sur un milieu vaste,
toujours incertains et flottants,
poussés d'un bout vers l'autre.
Quelque temps où nous pensions
nous attacher et nous affermir, il
branle et nous quitte; et si nous le
suivons il échappe à nos prises,
nous glisse et fuit d'une fuite
éternelle... »*

Pascal.

Ar stêr vraz war he fouez en em ruz
'Rez he ribl, dre zindan ar pont mên,
'Nez eur stroñs, 'nez eur hriz 'n he dour yen,
Ha 'nez trouz 'giz ar hoabr 'zo a-uz.

Mond a ra diouz Tro-Mêr da Lez-Kuz,
Dre zindan an oabl-goañv, war he flên,
Hag an oabl, 'rez ar ribl, en em ruz
Gand ar stêr dre zindan ar pont-mên.

Med ar pont hag ar wern 'zo a-uz,
A oa sonn war o fenn en dour yen,
Sed' ar stêr hag an oabl ouz o ren
En o has, ha d'o heul gand o stuz.

Ha va horv en-doa krog er pri druz,
'Mañ o vond gand an oabl hag ar glen,
Gand ar pont ha Tro-Mêr ha Lez-Kuz. —
Dre pe hud? da be leh war e blên?...

Ne lar ken : « ha penaoz 'z a ar bed? »
Rag ganin ez a reiz diouz e neuz :
'Giz ar stêr pa vez braz he dour-beuz,
'Mañ o vond war e bouez hag e led.

Na 'z eus pont na tra sonn ha ve kred
Ha ne jom nag an hent nag ar hleuz,
Na netra war e lerh gand ar bed :
Ar mên-font, ar mên-harz a zo neuz!

'Mon o vond war e bouez ouz e red,
'Giz ar stêr pa vez braz he dour-beuz,
Ha d'e heul 'z a va hoant ha va heuz
Rez-ha-rez en dour kriz war e led.

Ne lar ken : « ar joa vraz a d'ar red,
Ha padal da zour-chag 'z a ar reuz! » —
Nag ar boan nag ar joa n'ez int kred,
Hag an eil hag eben 'z a d'o freuz.

'Giz ar stêr 'mañ va bed en e roud,
Ha 'n o zerr 'z a va zoñj trem' ar skluz
Hag o galv gand he hroz 'n e leh kuz,
Trem' e vouill hag e spoum hag e froud.

Ouz e nerz en e chalm netra poud :
En e lañs 'z a ar frouez gand o spluz,
Hag ar bod gand e zeil — en o roud.
Ha va horv gand va zoñj — trem' ar skluz.

An dour reiz en e lamm 'z a da froud,
Ha da get, en e lonk, dindan guz,
An hañv hir gand e vleoni hag e struj.
Ha va brud gand he lorch hag he broud.

Pe an dour pe va gwad eo a voud?
Pe ar bed pe va hoant eo am zuj?
Petra vern, o va horv? — Emom boud :
'Mom o vond gand o red trem' ar pluj.

Chom a-zao evelkent hag heb aon!
Sell! an elf a zo sonnet er zaon;
Sell! er stêr emañ sanket o laon;
Sell! o laon a zo sanket en neñv...

— Na distronk emaint oll en êr gweñv!

Chom a-zao evelkent hag heb aon!
Rag ar c'hoant en da greiz a zo kreñv :
Sell! ar run ez eo reudeg e goeñv;
Sell! ar vag 'z a d'al lêz gand he roeñv...

— Na goustadig ez a ar stêr-Aon!

Mond a ra evelkent ha 'm-eus aon
Kreñvoh c'hoaz gand he red he fouez-traoñ :
Sell! en dour emañ liou an anaon
Ha n'eus krog nag a-raog nag a-dreñv...

— Ha d'ar skluz 'z a da hoant ha da leñv!

1958

KALA-GOANV

En arraj ruz, an avel vras ⁽¹⁾
A vres er-mêz an deliou seh,
O hej d'an traoñ, o hej d'an treh,
O stlej d'he heul 'n e anal sklas

E-giz ma nij dirag ar chas
An dridi kêz a leh-mañ-leh,
A leh-mañ-leh en avel vras
Dinijal 'ra an deliou seh.

Avalou fouesk dindan ar wask
A daol en êr o blazenn-dreh
Da gerse kriz d'o deliou deh...
Ha mesk-ha-mesk er menez kas
Da hesk ez eont en avel vras.

*

**

Ha fonn nep hañv na jom neb leh :
Avalou, kraoñ, a oam o klask,
Ha kistin rouz a oa o beh
E deil ar gwez ken livet deh,
D'o miroud klok na'z eus neb leh.
An amzer gouez ha beulz o drast
En avel feulz, gand deliou seh.—
Ha war o lerh n'eus ket da glask!

En avel 'vlej an Ankou sklas,
 Da skoill d'e red 'n-eus youl na breh,
 A-dreñv an deil 'mañ kuz e fas,
 O livad aour eo hud e vaskl...
 Or brud, or mad, or stad-a-hras,
 Or hement-tra, pe joa pe reh,
 Da bri ha flêr ar beziou sklas
 A ya 'n e lonk 'giz deliou seh.

1967

(1) An aozer e-neus skrivet "vras" evel ma vez lavaret en e barrez ha leh-
 all : "glao bras, avel vras, poent bras"... Lavaret e-giz-se "braz" (ha
 "mad") a dalv eun derez uehella.

Adnotenn gand Brud Nevez : skrivet on-eux "s" e plas "z" war houlenn an
 aozer. Eur gudenn a zistagadur, hag a ster, an hini eo. "z" a deu da veza "s"
 pa n'eus netra war-lerh. Keñveria gand "uer marh mad" hag "eur marh
 mat".

AR SPERNENN WENN

Da Gala-Mae ar wech ma 'z is
 Da dal al lenn
 E kavis bleoñ er vodenn spenn
 E para-viz.
 Da Hanter-Eost 'n-oa cheñchet kiz
 Ha ken ha ken
 Da Gala-goañv. Ha gwaz zoken
 A viz da viz.

E beure yen miz Kenver kriz
 Er stankenn wenn
 Dirazon c'hoaz va spennenn lemm
 E lintr he giz,
 Gand hiviz reo d'he skourrou stenn,
 Hinkiniou gliz
 Ouz beg he drein, hag enno skrij
 Sklerijenn denn.

Nag avel blên nag avel-viz
 Na hej na klemm
 Na trouz ebed e chapel wenn
 Ar stankenn striz,
 Med par d'eun êl 've skoet e nij
 E barr e voem
 E leuh a-serz va spennenn lemm
 Er beure kriz.

An heol a-dost a zo e giz
 Eun osti wenn
 Ha teuzi ra war gler al lenn
 E skleurenn vriz
 Endra ma strink er skourrou spiz
 E skinou tenn
 Ha gand o flemm, hinkinou gliz
 A vleugn a-grenn.

Ha bez' ema ar vodenn stenn
 E para-viz
 D'an heolig yen, e boem he giz
 Ha seizet krenn
 Ha strinka 'ra 'vel skinou lemm
 E skourrou spiz
 Endra ma sav, ma sav he nij
 Daved he gouenn.

Ablamour-ze n'ez in-me ken
 D'ar stankenn striz
 Na morse ken da forz pe miz
 Rag me a venn
 N'emañ ket ken e-tal al lenn
 Er beure kriz
 Rag eet ez eo gand kler ar gliz
 Da neñvou gwenn

Med mond a ray d'eun eurvez tenn
 E giz pe hiz
 Va ene kêz - gand pebez skrij! -
 Da leh e ouenn
 Ha neuze, flamm, e kavo boem
 Ar wech ma'z is
 D'am henta pask : koustiañs spiz
 Hag osti wenn.

Miz Mae 1968

PREZEGENN EVID AR HORAIZ

Va breudeur ger,
 Ra lenno mad neb a oar lenn
 E traou ar bed ha stumm o hiz :
 E Doue ken emañ or gouenn
 Ha warnom 'mañ arouez e viz,
 Davetañ 'z a ha dezañ 'denn
 Pep tra, peb den, dre vraz pe biz

Va breudeur ger, ma ouzoh lenn!

Tudigou kêz, pa vo d'ar poent
 Diwisket noaz or horv a liz
 A beb an oad, liennet gwenn
 E chapel wenn ar vazkañv kriz -
 Ha gwasoh c'hoaz pa vo d'ar prenn
 E kavell gwenn an arched striz...

Astennet sonn ha sonn a-grenn!

Pa vezo eet ganeom da benn,
 Furcherien pri - hag eet a-diz -
 Peb mare mad, peb mare tenn,
 Ar pezh a chal, ar pezh a blij,
 Diouz tu an horz da du ar yenn,
 Or foug braz pe yud or skrij...

Pa vezo eet or bed da benn!

... Vo greet ganeom? Netra ouspenn?
Ha kement tra 'do bet e briz
'N or buhez kent, da netra-krenn?
Da get ar bleoñ? da get ar gliz?
Or stummou Pask, or zellou lemm?
Ha gwrez or horv ha lañs e striv?...

Va breudeur ger, netra ouspenn?

Da eskern ken 'n eun arched prenn
E toullig pri eur bezig striz
Ez ay, deut koz, or paour kêz dremm,
Ken 'liez poan, ken liez kriz?
E-giz an tremp dindan ar boem
Ez ay da boultr or memprou skuiz?

Nebeutoh c'hoaz ha greun da vrenn!

Va breudeur ger, naren! naren!
Kement a vroud, kement a liv
Or horv ez-veo, kement a denn
Da gened hlan, kement a drid
'N or halon domm, a vo a-grenn
'N eur vuhez all, e berz he lid...

M'hel lavar deoh. Amen. Amen!

Sklerijenn zin pe lizenn wenn,
On ene eo, a-harp e nij,
On hini eo ha re or gouenn,
Dastumet oll gand bleoñ ha gliz
A oll-viskoaz, ha frammet krenn,
Sklerijenn zin, Baradoz wenn

Da viken-wir er Peurbad spiz

- Gand Doue ken e-unan-penn
- Gand Doue ken e para-viz
- Gand Doue ken er memez skrij...

Yaou-Bask 1968

Trede Lodenn

AR ZON DIWEZA

**DANEVELLOU
A RANN-GALON**

AN DAOU VIHAN

Diouz Manarti da Gernevez
Daou vugelig 'vel daou dehad
Krog o treuzi an dachennad
Nevez aret... Divarteze
'Vijent gwelloc'h 'barz o gwele :

Ken anouedet d'an daou zañvad!
Ken abredig diouz ar beure!
Breur ha c'hoarig diouz o doare
Hag o-daouig o klask tañvad
Kraoñ pe gistin, lod o hañvad.

'Dreñv ar paotrig prim e vale
Ken aheurtet gand e hoantad
Hi, ar verhig, krog o sklankad :
Broz ha boutou he huale,
Setu ganti am-boea dale!

'Hed ar hleuziou lemm or zellad
Ouz an deliou a velene,
O kraoñeta ni gantrene
Me a-wechou o c'hwitellad
Hi -wechou o torhellad...

- « Mah! dond pe chom ho-peus da choaz!...»
Ha war ma lerh e stleje-hi
He boutou-braz... - Pell-mat an ti,
E kerzem-ni da bellor c'hoaz...

Kelvez, haleg a zivere
War ar hrinenn, yen peb berad,
Gand ar hlizenn. - War an drevad
'Bare klouar heol miz here...

He fennad fuill a-rez ma skoaz
Da zastum kraoñ e oam deut di.-
Mah! dond pe chom, he-doa da choaz
Ha war ma lerh e leñve-hi.

Ganuz outi me a daere
War zigarez m'oa diwezad.-
Hag he daleou a zivere
War he chodou, tomm peb berad.

An douar gleb oa par da doaz,
He boutou-koad oa leun a bri,
Difronkou rust oa 'leiz he fri.-
'N he halon gêz oa rust ar gloaz
Rag dond pe chom he-doa da choaz.

Haleg, kelvez a ziheje
Beb mouch avel.- He halonad
A ziheje, beb alanad.
War he dremm a zislebere
Daelou bero a zivere.

- « Blokadou daou, blokadou tri
A gavim sur ma kerzom c'hoaz! »
E kerzen-me, ha gwasoh gwaz.-
Ha gwasoh-gwaz e poagne-hi.

- « Eo youd ho treid pe 'valou poaz! »

Che! na gweloud 'ran-me c'hoaz:
He boutou-koad a dennas-hi
Ha 'kreiz he brusk (oant leun a bri!)
'N he daouarn yen e oant e kroaz...

Ha 'wade ruz he zroadig noaz!

Ha 'n eur redeg e torhelle,
Ar paour-kêzig, rust he faz,
Hag e poagne ken e helle
'N eur barvacha da beb paz...
Dre he daelou e vousec'hoarze
Hi ar hoarig pevar bloaz,
Ha karadig e lavare
Ken truezeg d'he breur braz :

-« Blokadou daou, blokadou tri
A gavim sur ma kerzom c'hoaz,
Pa vim-ni deut en-dro d'an ti
C'hwî anezo 'po ar choaz! »

War chouk he zroad oa eur mell gloaz
A wade ruz e-touez ar pri,
Ha war he brusk e touge kroaz
'N he daouarn yen he boutou braz,
Hag ouzin-me, he breurig-ki,
Ar verhig kêz 'vousec'hoarze c'hoaz...

1949

tehad : eun bennag o tēhoud, na petra ken!

MARI VIHAN

ISTOR DRIST
EUR GWALLEUR BRAZ C'HOARVEZET ER BARREZ
GAND EUR VERHIG A BEMP BLOAZ
KASET D'OBER KOMISION
EUN DEVEZ A FALHADEG...
DISPLEGET AMañ DRE AR MUNUD HE FASION
E DAOUZEG TOLENN
KORVIGELLET
GAND PEP HINI HE SONEREZ, HE LUSKEREZ, HE
LIVADUR
HE REOLENN
HERVEZ FROMOU AR HROUADUR
HA VA FROUDENN RIMODELLER.
DANEVELLOU HA DIVIZOU,
AN DILLAJOU, HAG AL LEHIOU HAG AN DUDOU
TOUD AN AFER, TOUD AN NATUR
ZO GWIR-BATER.
(MED AR GWINVER 'M-EUS IVANTET!)
C'HWI ESKUZO VA FALTAZI
AOTROU LENNER
HA DAMALLO, MA 'Z EUS FAZI
GAND SKRIVADUR,
AOTROU RENER
EMBANNADUR
"MARI VIHAN"
ANDRO MERSER

MARI VIHAN

D'ar prajou, d'ar perzier
Gand gwilaj embannou!
War laonenn ar filhier
Eo lijer e daoliou!

Lapoused ar girzier
A virvill en deliou!
Dre doullig an heolier
An heolig ra goueliou!

Eur verhig er zolier
Dihunet 'n he fillou
Digillet ha milliour
A vrezill d'an heolier
'N eur spia keleier....

Savar eston, soniou sklintin:
Pres ar falhad 'strink er zolier!
Mên-higolenn war ar filhier
Rust ha skrijuz 'dint er mintin!

Gand ar haoter trouz ar potin...
Pres al labour gand bouteier...
Saillou, listri...Nag a stirlink
Zasson hirio tre d'ar zolier!

Kaoziou ive n'int ket boutin
Zeu daveti dre speurinier:
Savar seven mammig tener,
Che! ha tadig c'hoaz er gegin?
Geriou groñsig, geriou sklintin...

- "Mari vihan zo re vihan, hel lavaran.
Biken n'hellond he-unan da di Berhed.
Re hir' vezo gand he zroiad 'vid or zehed:
Falhad div eur heb eul lonkad vefe damant!

- Deut zo dezi 'walh a skiant hag a barlant.
Mestr d'eur voutaill eo he divreh, 'vo ket trehet.
- Mari vihan zo re vihan, hel lavaran.
Gwell e vefe mond hoh-unan da di Berhed,

Rag m'hen-asur! seurt boutaillad gousto arhant!
- Bravoh neuze! Merenn amañ vo dioueret
War zigarez eur voutaillad am-bo kerhet?
Daoust ha falhad hep korvata zo dizamant?

- Petra 'rafe tud ar foenneg heb gwin-ardant?
Brao 'vim ganti! Goude deg eur 'vint dinerzet!
- Set 'er giz-se Mari vihan bremañ-tuchant
'Z ay d'an davarn, fichet dezi, prim he herzed.

- Mari vihan zo re vihan, pa lavaran!
Fizioud enni seurt kefridi vefe pehed.
- Plahig ampart zo anezi, n'on ket nehet:
Brao e tougo rom 'n he sahi'g Sakramant!
Red eo deom-ni kaoud mitizien euz or merhed.

- Chañsuz vefe d'eur seurt matez kaoud koumanant!
- Ma! koulskoude hirio dezi vezo kredet.
- Set 'er giz-se eur voutaillad vezo brevet.
- Mari vihan eo he herho, peotramant...
- Mari vihan zo re vihan, pa lavaran!

Eur zeizenn wenn 'n he huchad du
Ha lez he sae e pleg he glin,
Eun taolig torch a-dreuz he min,
Eun taolig krib d'he bleo 'n o fu,

Eur zeizenn wenn, ha mad dioustu!
Na fichet eo d'ar plahig fin:
Eur zeizenn wenn 'n he huchad du
Ha lez he sae e pleg he glin.

He zreid a verv 'n o loerou ruz:
" Ar paner braz a'z ay ganin,
Ken brao ha tra ha paz ne vin."
Ha hijal ra diouz tu da du
Ar zeizenn wenn 'n he huchad du.

"Mari vihan zo re vihan, a lavarer?
Re hir vezo? - Sell anezi o vond mibin
Drip ha drapig, gand ar garront war ziribin!
Daoust ha ruza war ar grinenn ra he faner?

Savet ganti, ken m'eo troñset he zavañcher!
Dalhet uhel, ken m'eo tanet he ching-piñsin!
Mari vihan eo re vihan he divesker?
Pemp bloaz dezo. - Sell en heñchou na zant mibin!

"Gla'o a vezo pe ne vezo? - 'm-eus ket amzer
Tud ar harter d'hoh alia. Sellit ouzin:
Pres zo hirio gand ar boeson liou d'ar rousin.
'Mon o rede'g da di Berhed gand va faner."

"Bremañ-tuchant 'savo foug'e er foenneier!
Oll e larint: "pebez maouez!" pa zigouezin.
Neuze, primig, plom e savo toud ar filhier,
Med ouz tadig 'vo sebezet e vouse'hoarzin..."

"Mari vihan zo re vihan? Re vraz gevier!
...Na bokedou, che! dre-z-amañ, ha bleoñ kistin!
Med arabad harpal hirio evid trichin,
Med arabad dale bremañ gand louzeier,
'Mom degouezet e ti Berhed tre d'an defin!"

- "Paour-kêz bihan! tomm eo deoh-hu gand ho paner.
- Rom zo ezomm, eur voutaillad 'vid nerz-mintin.
- Deoh da zougen? C'hwi he zorro ha vo revin.
- Mamm ho paeo, mad he dougin, tra na dorrin.
- Bez' vo torret, che va Doue! pe en dañjer!...."

Eul litrad rom er paner du
A stok e lañs da veg he glin,
Ha krizia ra d'ar verh he min
Ha glebi ra he bleo 'n o fu.

Eul litrad rom ha kuit dioustu!
Na sammet eo d'ar plahig fin:
Eul litrad rom 'n he faner du
A stok e lañs da veg he glin.

He zreid a goaz 'n o loerou ruz,
Pa stou a-raog, e sach a-gin,
Med kaer o-deus he diouvreh blin
Streboti ra diouz tu da du
Al litrad rom er paner du.

Mari vihan zo re vihan? Mad e welint
Pebez maouez 'z eus ahanon... Eun abadenn
Fei! e vezin, rag pounnerig ar joupadenn!
Red eo bale, douget 'vezo 'giz ma hellin.

Mamm zo du-ze, kriziet dezi, war amzivin.
Tad a hortoz, kruget dezañ war e andenn.
Mari vihan, maro outi pleg he ilin,
'Z a goustadig. Poent eo harpal eun abadenn....

Mein ar garront luh o hailhastr e-giz kregin,
Foenn o kraza war an avel gas e vlazenn,
Tommheoligou 'zav o fennou dre ar hlazenn,
Hag er girzier zo c'hoar zadenn gand ar gegin.

Deom adarre. Goude merenn, diouz ar girin
Fresk he havig, 'z in d'o doura gand ar volenn;
'Kreiz ar glaster, gwenn e skedo ar spern-irin;
War ar filhier skiltr e skrijo an higolenn.

Nag eo c'hwezet, Mari vihan, da benn livrin!
Kêr zo tostig, set' ar hoadig zo e-kichenn
Gand ar rohell 'dreñv ar riboul, 'giz eur zichenn....
Nag eo kignet palv da zaouarn gand pep ivin!
Ha diskennet samm da baner diouz da varlenn!

Bouill an heol 'zailh er hoadig dre eur ribin,
'Kreiz e vannou ra horjellou eur valafenn;
Sell ar rohell, pebez torchenn! -"Ha ma'z afen?..."
Goude, buan, skañv ha difrê e tigouezin:
"Mari vihan, pebez plahig!" -E souezint.

"Bez' 'z eus amzer, petra double! eul lonkadenn
Vez seul welloh, gouzoud 'ouzer, seul hortozet
Vez muiohig, ha seul vuioh eer repozet
Seul vuannoh 'n hini 'z eer d'eun drehadenn.

Gwir a larer: gwelloh harpal eun abadenn
Kuit a dermal seiz sadornez... Mad ve skinier
Beb a vare 'hed an heñchou... Eur skuizadenn
Sur! eo homañ, 'z a war wasa dre ma pigner.

Groom eun azez. Chom en heol zo diskiant:
Bez 'eus amañ eur pezh skabell 'rez ar raden!
Med eur sklosenn... Ha parvacha... Eur stokadenn!
Greet eo ganti! Gand nerz-mintin! N'eo ket dienn...
Gwerhez Vari! Paour-kêz mammig! Mari vihan!...

Gand ar paner eo bet strobet,
Gwer ar voutaill he-deus stoket,
Tenn he anal he-deus lonket,
Trumm er hoadig en-deus nozet!

Nann! n'ho-peus-hu tamm diskroget
Paour-kêz daouarn zo ken kropet:
Gand ar paner eo bet strobet,
Gwer ar voutaill he-deus stoket,

Par d'eur hlohig he-deus bobet!...
'Rez ar raden 'mañ-hi beulket,
Gand he seizenn par d'eur boket,
Par d'eur boket ve bet trohet...
Gand he faner eo bet trehet!

Ar rom a red er paner du
Ha redeg 'ra ouz penn he glin.
Dislivet eo d'ar verh he min
Ha glebet eo he bleo 'n o fu.

Darzodet-nê e kouez dioustu
'N he hoazez mik, ar plahig fin,
Med krog a zalh er paner du
E-pad ma vezv ar hoadig pin.

Ar rom a red ha ken a fu.
Difronkal 'ra a-benn ar fin
A-bouez he beh he halon vlin,
Med daoust da ze he daouarn ruz
A zalh o hrog er paner du.

'N he diwreh gwenn
A-benn ar fin
War penn he glin
E souch he dremm.

Med war he fenn
Da lammou blin
Ar seizenn wenn
Ne vo ket fin.

Da heul he hlemm
Er hoadig pin
E hijo rin
Eur glahar tenn
Ar seizenn wenn.

Pellohig er prajou
War laonenn ar filhier
Gand gwilaj zo glazou
D'ar verhig he ficher

Tostohig ra kañvou
Gwez-rousin a ziver,
'N o deliou ra leñvou
Mouch-avel pe giller.

Dirazi er bodou
Zo motet eur gwiñver...
Med leskuz o niver
War leskad he chodou
Eo chalmet he daelou

Ha kousket ar verhig.

ROZENN MIZ DU

... « Bremaig e teu ar paotr d'ar gêr!
O Mari-Joz! O Mari-Ren!
Poent ober koan ha bale gren...
Ar paotr, c'hwi oar, zo eet e kêr!

Ha skrivet mad en-doa diziou
O Mari-Ren! O Mari-Joz!
E vije deut d'ar zul d'an noz,
Setu ma teu d'an devez hiou.

Hag ober ran eun tammig cher,
Eur zoubenn dous, ha c'hoaz zoken!
Ken ral a wech e vez er gêr...
Kemend a draou en-deus da ren!

A ze, m'ho-peus eun dousenn viou
Da bresta din a-barz serr-noz?...
Chê, dond a ray 'benn eur pe ziou
Ha me jom c'hoaz da gonta kaoz!»

Taol skub d'an ti ha chou d'ar yer.—
(Emañ d'ar poent o vond d'an tren!)
Ar vaouez koz ra ken ha ken,
A lak an doal, a lak ar gwer :
Emañ ar paotr o tond d'ar gêr!...

Ha greom tan braz : m'en-defe riou!
Ha bravad tra : eur boked roz
A vleunie c'hoaz 'n eur hornig kloz.—
'N eur podig glaz, emañ 'vid piou
Ar rozenn ruz bet trohet hiou?...

*

Degouezoud 'ray a-benn emberr...
(D'ar poent emañ e Kemmen-ven!)
'Vid ober hent 'do amzer yen!...
Dija an noz? Na devez berr!

Bremaig vo trouz e voutou-lèr.

Ha skedi 'ray e zremmig vliou
E toull an nor a-greiz an noz,
Ha c'hoarzin 'ray 'n e genta poz,
Ken ruz e jod gand krog ar riou!

Eur paz er porz? ez a e-biou...

Ha paziou all.— « Na 'z eus deut den?»
An tad 'n hin' eo, e zavar groz,
— « Skrivet en-doa : war-dro serr-noz!»
A lar ar vamm 'n he savar plên.

Er-mêz ra noz hag avel yen.

An eur a zon a-daoliou herr :
— « War-raog emañ diwar diziou!»
— « Da gonta kaoz 'n eur vond e-biou
E chom, me-bañ, e porz kreiz-kêr!»

Ar vaouez kêz 'z a fall he liou.

An tad en-dro a daol e boz :
— « 'M-eus aon, lar-eñ, ne zeuio ken!»
— « O yao 'michañs! » a lar eben,
Hag ouz he horv e stard he broz.

Ha gand he neh he mouez a gren.

An noz 'n o hreiz a zil he riou;
O zoñjou kuz a 'z a gand herr,
Spontet a-grenn gand aonenn dêr :
Da glask ar paotr ez eont o-diou —

Chê! Keid-all 'zo n'eo bet er gêr!

*

Dirag an daol, heb ober kaoz,
A-bann o fenn er goulou berr
Emaint o-daou, o-daou 'n o zerr :
Anouedet int 'n o halon gloz.

Karantez wir zo eet da faoz :
Emañ ar paotr gand koan e kêr
Oh ober cher, oh ober kaoz
E goudor tomm ha goulou sklêr.

Deut eo ar goañv da heul an noz
Ha skarnil 'zo war-nij en êr
Ha tre d'an ti eo deut e flêr...
An deliou hañv a ruill er foz,
Er gwez e freg an neizou koz.

*

Ne zeuio ket ar paotrig ker,
Ne dalv ket 'boan hen gortoz ken,
Ne dalv ket 'boan al loaïou stên,
Ar plajou-liou, an doal, ar gwer...
Ha soñjal reont. Ne laront ger.
Ar zoubenn dous a riell, yen.
Chê, n'eo ket deut ar paotrig ker :
Ne dalv ket 'boan ar rozenn ken!

Ar boked ruz a-drumm a ver
E flokad fouesk d'al leurenn-vên...
E chom ar bod, e chom an drên,
E greizenn hleb a za da gler.
N'o gwelo ket ar paotrig ker...

Miz here 1957

AN AOTROU BREUT

-A-sa-sa
Yann gêz ma gwaz,
Poent braz eo mond, hel laran deoh,
Da weloud tud ar C.M.A.
M'or-bo erfin ha pae ha peoh....

-Ma! Neuze 'ta
Chanig ar wreg,
Marteze 'z in ha hiou d'an deiz
Da weloud tre d'ar C.M.A.:
'Vid kaoud ar viou dao mond d'an neiz!

-Ya seur! ya!
Yann an ti all,
'Mon ' vond e kêr, rag afer 'm-eus
Ouz pennou braz ar C.M.A.:
Ha ma vo dao, e rin-me reuz!

- Hopa-la!
Aotrou polis,
Mar plij ganeoh- me Yann Gerveur
Ar berra hent d'ar C.M.A.
Rag aon am-eus da goll war 'n eur.

- Mil eskuz 'ta
Ma dimezell,
Paperiou 'm-eus, emaint ganin,
Ha pratik on d'ar C.M.A.,
O lennit mad, c'hwi laro din....

....AR C.M.A?
ME LARO DEOH, LENNERIEN GER,
MA LENNIT MAD, PE STUZ A REER
D'AN ANO-MAÑ, KROAZ-DOUE VERR,
HA KEMENT TU GAND TUDOU KER
DA DENNA LEZ DIGAND YANN GOUER!

...AR C.M.A?
CREDIT MUTUEL AGRICOLE,
CHAMBRE ET MAISON DE L'AGRICULTURE,
COMPAGNIE MUTUELLE D'ASSURANCES,
COOPERATIVE DE MATERIEL AGRICOLE,
CONFORT MENAGER DE L'AGRICULTEUR
Hag all, hag all
'giz lar re-all
Da laroud eo: "et cetera!"

-HAMA PAOTRED!
MA 'Z EUS AMAÑ DIVINADENN
N'EO KET HINI TEIR LIZERENN.
C'HWI A WELO EM HONTADENN
GWALL-ZISPARTI SPEUR EUR WERENN
'TRE DAOU VUGEL TOST DA VREUDEUR,
MED BUGALE DEUT DA WAZED,
EET DA VOGED LUT O HREUZEUR....
DA ZIVINOUD PIOUS 'N-EUS NAHET!

- KAMARADED,
KROGOM GANTI HEP GOUZEZA
GAND SKLERIJENN. SET DIRAZOM
SKINWELEREZ RADIO-ROAZON
GAND ABADENN: "BREIZ O VEVA!"

-O-ta! o-ta!
Ma dimezell,
An teulioù-se a verk ez-gwir
Eo dleour din ar C.M.A.:
Da betra 'talv ar skridoù hir?

.....

- "Dao mond da gaoud an Aotrou Breut
Ma Aotrou kêz... Vo nann pe ya:
War-dro ho koul en ken a ra.
Kemerit plas da heul ar steud."

Eo rok he homz d'ar plahig treud
A-dreñv he draf er C.M.A.—
Hag eñ, paour-kêz, gand dillad teuh
A stou e benn ha mond a ra.

Ha mond a ra 'n eur vale teuk
Da lost ar steud, an hini 'z a
Daved an draf e leh ema
An dalh, ar gwir, ha galloud reud
Ar C.M.A. : an Aotrou Breut.

Dao 'walh eo chom: ken pell a oa
E tlee dond! - Ha sed eo deut
E kêr, abred, ar houerig heut
Ha pellig 'zo er zal dija!

Gand paper-timbr ha merkou-gra,
Da draou eo deut da glask o neud
Ha gwelet vo: eo den-a-dra
Gand dillad sul ha galleg peud.

War-raog eo eet, ha gweloud 'ra
A-grenn an draf diouz kreiz ar steud:
O! Che! war-wel an Aotrou Breut!
Frañsoaig 'n hin' eo! Le Breut François!
Bet eet da bell ha pell-a-oa!...

Ha dre e zoñj, gweladenn-gill
Ar houlz gwechall: ar skol... he ziff...
O boutou-koad, hag, eet dre uz,
O loerou toull war daoulin ruz...
Ya, gweloud ra o dillad truill!

War hent ar gêr o vond d'an tuz
Gand friou tougn ha chodou kuill
Ha loerou toull war daoulin ruz...
Ya gweloud ra o fennou fuill!

Ha tro ar stêr: e-kreiz ar vouill,
Eun devez hañv, e traoñ ar skluz,
Emaint o-daou o tapoud dluz...
O gweloud 'ra: o-daou noaz-pill!

Ha tro ar hoad, o tilenn lus
Eur wechad all! -pe kignez ruz
E-leiz o breh, gand peb a duill
A vodou leun ha diouz an druill...
Ha stad 'n o-daou gand memez buz!

Ha gwechou all, dre winiz puill
O vond a-dreuz, o vond a-ruz,
'Vid kaoud er gêr ar memez strill...
'Vid lod d'o daou er memez buz!

Ha ped gwech all, an neizou kuz,
Ha ched ar had, ha toull ar grill...
Ha beh o-daou war memez skoill!
Ha treh o-daou gand memez buz!

Ha selloud ' ra ouz 'n Aotrou Breut
Zo bet gwechall ar paotr Frañsoa,
Frañsoaig Ma-Louj an hini oa,
Ma-Louj e vamm, eun draig treud.

Tostaad a ra ouz penn ar steud
Gand mall ha neh. -Ha gweloud ' ra
E zillad kaer d'an Aotrou Breut
Ha sellou taer ar paotr Frañsoa...

E barr e vrud, e-kreiz e vleud,
Dre zrefen gwer ar C.M.A.
War gement den, war gement tra,
Gand geriou piz ha neuziou reud
E ra ar mestr an Aotrou Breut!

Dirag e zraf n'ez int netra.
An dudou kêz, o begou kleuk,
O heinou kromm, o neuziou teuk,
O klask e rest d'o feadra.

D'an Aotrou braz ha den-a-dra
Arabad ve gwall-ober feuk,
O kouerien gêz, gand tra pe dra,
Gand kaoziou treuz ho pegou kleuk!

Gand doujañs reiz da heul ez a
Ha dond a ra da benn ar steud...
Ema war-wel d'an Aotrou Breut,
E zremm er skleur, ha nehi 'ra:
Dirag an draf ne lar netra!

Med dre e zoñj, galvadenn-hud
Ar houlz gwechall: er gêr, o zud
Gand kaoziou puill! -Ha ragach pik
Ma-Louj, e vamm, e vamm Mariig,
O-diou er porz o kas ar vrud!

Ha klevoud ' ra c'hoariou "barz-tig",
Hopadeg skell ha moueziou pud
Paotr Mari-Louj ha paotr Mariig,
O-daou er porz o youhal yud!

Ha klevoud ' ra d'an eurvez vud
Brezonég puill, brezonég rik:
E korn ar hogn, an daou a wik
'Giz dridi rouz er memez klud....

Digouezet eo - ha poent e oa! -
Da doull an draf. E dro zo deut,
Ha kinnig ' ra 'tre bizig-meud
Ha bizig-yod, ar merkou-gra,

Ar paper-timbr, e leh ema
E hano, sklêr, da heul e reustl...
Al leuska 'hell o hinnig ' ra
'N eur zelloud pell e trem' an treust.

An Aotrou Breut o hemer 'ta
Ha stag d'o lenn gand sellou leusk,
'N eur hrozal groñs: "...paperiou teusk!"
...Pa ouie 'walh ha pellig 'oa
Da biou e oant ha piou e oa!

Heb ober van, na ger na tra
 (N'emaint ket ken gand kigenez ruz!)
 Mestr meur ar zal a zin 'mez-tra.
 Ha sinet 'n-eus: Le Breut François
 D'e vignon braz eur mare-oa...
 (N'emaint ket ken o tapoud dluz!)
 Ha skrivet: *oui*, da laroud: ya.
 (N'emaint ket ken gand memez stuz!)

Hag astenn ' ra, ar houerig heut,
 (N'emaint ket ken er memez bouill!)
 E trem an draf e zaouarn reut,
 E trema dorn Frañsoaig Ar Breut
 ...Da zastum rah e zuillad neud!
 (N'emaint ket ken oh ober noill...)
 Ha mond ' ra kuit 'n eur vale teuk:
 N'emaint ket ken gand memez skoill...

Kerzu 1973

C'hoariou "'barz-tig" : eur c'hoari bugale vihan. Unan anezo o redeg war-lerh ar re all hag o klask toucha anezo a-barz na gavfent repu en o zi. D'an hini touchet "a-barz an tiig" da redeg d'e dro war-lerh ar re all ma kredont dond er-mêz. Ar pezh a rankont ober ar pella-gwella.

NEDELEG LAOUEN

BUHEZ KATARINIG D. HAG HE FAOTRIG VON
 HI GAND ANO PLAH HEB ANO GWAZ
 HA MATEZ DRE DRUGAREZ GAND AOTROU HAG ITRON:
 PENNRENEREZ VENGLUZIERIEN AR VEIN-GLAZ.
 EÑ GAND ANO MAMM 'LEH ANO TAD,
 SPEREDET LEMM HA NEUZIET MAD,
 DIJA ER SKOL EN EILVED KLAS...
 HAG INT O-DAOU E-TOUEZ AN DUD OH ABFAAD
 GAND CHODOU TOMM, MED YEN O HOARZ
 GAND ANOIOU GREET ANEZO DRE VILONI PE DRE HOAP:
 AR "VOTEZ TOULL", AL "LAPOUS KARZ"!

MED DA GENTA:
 BEZET AMAN PE MOUKSONET PE MOUSKANET
 TONIOU LAOUEN AN NOUELOU
 ANAVEZET...
 ANAVEZET MAD DRE'Z ENNO, HELIGENTA
 PE GANAOUENN HA PE GELOU
 GAND AN ELEZ
 D'AR BASTORED WAR O MENEZ:
 " GLOAR DA ZOUE 'BARZ AN NEÑVOU!
 WAR AN DOUAR PEOH HA BENNOZ
 D'AN OLL DUDOU GLAN O MENOZI!..."

KLEVIT BREMAÑ, KOMPAGNUNEZ, TUD A LIGNEZ
 - HA KRISTENIEN! -
 E PE DOARE, GAND PE BEHIAD HA PE DEVEZ
 'TEUAS SKILFOU D'AL LAPOUSIG, HAG E ANIEN,
 E TIEUBAS E VAMM-LAPOUS DIOUZ HE FEHED
 HAG E TORRAS O CHADENNOU A BEHERIEN!

MED DIWALLIT:

*MA VE HEÑVEL EM NOUELENN TRA PE DRA OUZ TRAOU A-FED
TIER, KERIOU, HA DIGOUEZIOU, KIZIOU TONIUZ PE RE DRUILLEG,
HA MA TENNFE EN DEIZ HIRIO DEN-MAÑ-DEN DA DUD ZO BET
VON PE JILI, KATARINIG MARI-LENA PE AR HUILLEG
RA VO SONJET EO A-RATOZ, KEN DRE GAER HA DRE RED:
MEUR A HINI A DENN C'HOAZ DA VEUR A HINI A ZO BET.*

NEDELEG LAOUEN

I

Eun ti otuz e Pont-Koblant tu da Bleiben,
Gand prenestrou 'vel re iliz, leun a houlou.
Eur zal-debri, leun he zoaliad war ziu riblenn
Gand gwerennou a strink enno ar sklerijenn.
Eur mell oaled leun a regez hag a elien,
Ha dirazi lèr ha feurenn eur re voutou...
Eun ti euruz e Pont-Koblant, noz ar pellgent,
Gand eur hraouig hag eur zaprenn leun a houlou.

Gwreg hag ozah 'deus kefridi gand pakadou,
Paper livet war pep hini ' liou d'e zeizenn
Skoulmet ledan... Gand braoigou, gand boestadou...
Gwreg hag ozah 'deus kefridi gand pourchasou:
Traou distrailler, gwin a Vourdel, ha rolladou
Ar gouvidi hag ar meuziou diouz o reizenn...
Gwreg hag ozah 'deus kefridi gand dilladou:
Gwenn e roched, med he horfenn leun a feillenn...

Hag ar vatez zo dirazo war he saouzan,
Prest da gemer, prest da zerhel, prest da ginnig,
Gwech ar feurenn, gwech ar spillenn, gwech ar porpant...
-" 'Ma unneg eur! Gand ar wetur vo dizamant
Mond da Bleiben... Ha d'an distro vo êzamant:
Tan en oaled, rag on treidou vo rividig,
Yen an iliz, hag ar hure zo ken yaouank
Ha digompren: e brezegenn vezo hirig!

- "C'hwi ziwallo mad er hleier, Katarinig!
 C'hwi a raio diouz o bole ho teskamant:
 Peur ar zoubenn, peur an istred, peur ar zilsig.
 'Vid ar re-ze bara-zegal, bara-minvig
 'Vid ar re-mañ: bevañs yenig pe leskidig
 Zo da aoza rik d'e vare, plahig yaouank!"
 ...Gwech o kemer, gwech o terhel, gwech o kinnig,
 'Ma dirazo Katarinig war he saouzan.

- "Tud ar maner vo ganeom-ni, uhelidi,
 Tudou toniuz: c'hwi 'ziwallo mad 'n ho neuziou
 Ha 'n ho tillad, ha 'n ho komzou, ha 'n ho listri.
 Pa zigouezint, c'hwi ' gemero ho mantilli,
 C'hwi vo lijer, c'hwi vo sichant ouz pep hini.
 C'hwi 'ziwallo en tu kinnig 'vid ar meuziou,
 Plên ha goustad, rag an istred dre o hili...
 -" Rag an dud-se zo perhenned d'or mengleuziou!"

- "Gand ho pale, hoh arbilli, ho kaoteriou,
 C'hwi 'ziwallo da zihuna or mab Jili
 O vousec'hoarzin dre e gousked gand misteriou,
 Ken birvidig gand ar paotrig e bateriou!...
 Dao eo din-me mond d'e gloza 'n e liñseriou!..."
 Hag o daouig, ind-i pignet gand an diri.
 Ouz o gortoz, he-unanig 'n he frederiou,
 Katarinig ' za he soñjou en he hini...

Ha gwasohig e peg enni eur brederenn:
 Che! da bed eur 'hello redegetre d'e veteg?...
 "- Katarinig, echu servij, echu kempenn,
 Mond e helloh. Ha da eiz eur 'z eus overenn...
 C'hwi a raio 'vel ma karoh ho keustereenn
 Beteg deg eur... Med da houe dao diredeg:
 C'hwi a zeuio kenta-gwella d'aoza merenn.
 Med da eiz eur 'peus overenn e bourh Gwezeg."

II

Eun ti bihan, toenn izeleg
 Ha penn ha penn gand loch pe graou.
 Prenestr teñval, dor preñvedeg,
 Eun ti bihan ha truezeg
 Kluchet izel er strouezeg
 War ribl ar stêr, 'n e dapinaou...
 Er gamboulenn, tu da Wezeg,
 'N eun distro kloz eur hoz ti-laou.

Eun ti bihan ha gwaskedet.
 Eun damsklerijenn a houlaou:
 Arbell goaret, treust mogedet,
 Tachou melen, priach livet
 Tamm pe dammig zo diskouezet:
 Diouz peseurt kleuzeur war-enaou?
 - Eur mell piltos hanter-zevet
 E-kreiz an oaled a houlaou!

Noz ar Pellgent, noz riellet,
 War zaouzan kaer ema an traou:
 Ti pe betra 'n-eus horjellet
 Pa 'n-eus brallet, mezevellet,
 Eur rumm kleier?...Strobinellet
 Eur podig rouz a domm er glaou.
 Eur re voutou dibriellet
 Dirag an tan a zihenaou...

Hag eur bugel demvoredet
 'N e wele striz a glask selaou...
 Dre e huñvre? dre e gleved?
 Nag a gleier en noz kleret!
 Hag er prenestr nag a stered
 A zeuy da wir o fromesaou!
 Med pastored gand o deñved
 A ve d'ar poent e-mêz o hraou?

Taoliou kleier gouel Nedeleg
 A-stok o lañs 'z a daou-ha-daou.
 Fres ar hleier 'du bourh-Gwezeg.
 Noz ar Pellgent, noz steredeg
 Dre ar prenest fres ar stered.
 Diouz tan an oaled e houlaou
 Diou votezig el ludueg:
 Ar Mabig Jezuz n'eo ket gaou.

Na baradoz gaou kenneubeud,
 E leh ema an tadig paour
 Marvet trumm hep bez' eureujet!...
 Gand baradoz eo damskleuret
 Diouz ar gwele d'ar geuneudeg
 An ti sioulig a vadaou
 Gand kaouajou kleier eured
 War sklent an doenn da heul an naou...

Gand an êlez zo kanadeg,
 Sonadeg iliz mil ograou,
 Ha gand tadig on diwallet!
 Pa zigouezoh, mamm garadeg,
 Ho taoulagad eet marvalleg
 A gavo tad ha paotr o-daou,
 Ha d'hoh anoued, war an oaled,
 E kavoh tomm eur banne traou.

III

- "Dleet 've deom-ni, laran deoh-hu, roi digemer,
 Eun tamm gwastell hag ar hafe, hiou, d'ar vatez
 Ha d'he faotrig... Brao e vefe se da geñver
 Gouel Nedeleg, ginivelez on Dasprener!
 - Mari-Lena, c'hwil 'peus klevet eur prezeger
 N'eus ket pellig, med arabad mond da zantez
 Daoust d'an iliz, rag ar paotr-se, ma n'eo peher,
 Zo kement-se frouez eur pehed a garantez!...

- "Heller laroud: frouez eur pehed a yaouankiz:
 Hi c'hwezeg vloaz, naonteg dezañ, eur mengleuzier,
 Hag e ouzoh pegen prontig bet ar hastiz:
 Pa oe ganto kaoz embannou, goude lastez,
 Eñ voe flastret 'barz or mengleuz... hag hi brazez!
 - Hag intañvez hep sakramant na gwalinier!
 - Med ar paotrig 'oe dizaotret en dour-badez!
 - Gwad eun targaz a red ato en e gizier!

- "Hi kement-se he-deus dellid, daoust d'he harzad,
 Beza dalhet, beza savet he bugelig,
 Ha d'or zervij pegen dousig, pegen ampart!
 Diwezatoh or mab Jili pa vo krennard...
 - 'Ray e vevel, a hras-Doue, pe e zeskard
 Euz al lapous, med da hortoz, ve berboellig
 Degas hennez d'ober amañ e damm kanfard.
 Brao ve dezañ kaoud ouz Jili e gazellig...

- "O fask kenta 'rint a-gevred a-barz pellig!
 Ha marteze, diwezatoh, amzer-zoudard.
 - Koulz en iliz hag en arme, gweloud 'hellit,
 Den 'vel gwezenn ra e zeliou diouz e gellid.
 - Doue diana a oar ober diouz hon dellid.
 - Greet 'n-eus Doue kern d'an taro, kov d'ar boskard.
 - Ha pardonet d'ar Mab-Foran diarboellig
 - Oa Mab-Foran paotr a famil, n'oa ket bastard!"

- Gwall yaouankig ho-poa kaset da zavadur
 Strad ho mengleuz tad ar bastard, heb ampartiz...
 - Din da goves? Braz 'ma warnon ar sabatur!
 Tad ar bastard oa gwall-benneg, fall e natur.
 - Aon ho peus-hu euz unneg vloaz e grouadur?
 - Aon am eus-me pa gemmesker mestr ha lakez.
 - Che ma Doue! 'vid aluzenn eur blijadur!...
 - 'Vel ma karit! Pedi 'hellit paotr ha matez."

IV

Gouel Nedeleg, 'liou orañjez
Evel ar flamm e toull ar forn!
Eun aouraval, O braventez!
Eun aour-aval, O largentez
Mabig Jezuz ar baourente!
Eul lagad aour da voutou born:
N'eus 'med unan 'vid diou votez,
Med krog zo ennañ 'leiz an dorn!

- "Seurt aour-aval zo, va mabig,
A-berz ho tad a zo en neñv...
Bez' oa sichant, bez' oa madig,
Pegen tommig oa e avig!
Pegen flourig e allazig!
Ho tad 'oa just. Ho tad 'oa kreñv.
'Peus digantañ ho lagadig,
Digand ho tad a zo en neñv..."

- "Che! ma faotrig, bez' om pedet
On-daou, gand Aotrou hag Itron,
D'ar hafe di... Dalh ho-pezet
Gand ho tillad nevez-prenet!
Red 'vo eno bez' sevenet:
Lavarit frêz ha plên ho ton
'N eur zamstoui kenta gwelet:
" Va Aotrou mad ha va Itron!..."

"...Debri nebeud hag hep batouz,
Na diskouez heug ouz tra ebed.
Goulenn morse. Ato gortoz.
Chom didrouzig, laroud bennoz.
Nah pep gweneg vil e venoz:
Na'z eom ket di da glask or boued.
Gwall-labouret 'm-eus-me henoz.
'Vid beza paour n'eus mez ebed."

"...Ma kemerit re lipigou
Ho-po ganin sell du a-gorn.
'Rabad avi ouz bravigou
O faotr Jili... C'hwi ' ginnigo
Hoh aour-aval da Jiligou,
Ha roit da heul ho torn d'e zorn...
Lakit mantell ha manegou
Rak yen eo 'mêz ha teo ar skorn."

V

Mamm ha bugel gand hent rivet a'z a founnuz.
Kran ar paotrig gand manegou ha bleo kribet.
'Leiz e zornig e aour-aval zo burzuduz,
Douget gantañ 'vel goulouenn gand eur hurust!
War o fouezig: 'maint war weled d'an ti otuz...
-"Sell anezo, Mari-Lena, nag int gwisket!
Zo da ziwall diouz peorien zo re lorhuz!
- Katarinig zo bet ato maouez lipet..."

- "Chañs Nedeleg, matez kreduz, ha levenez!
Deuit d'azeza, poent eo deoh-hu, er zal wrezuz...
Koant ho paotrig! kaer e zillad, ha giz nevez!
- Matez paourig, n'eus ket warnañ liou dienez...
Ha manegou! Bez' e vezo kemenerez?
Asa lampon! da zaoulagad zo gwall-vervuz!
Skip da gorvig, med 'vid labour mengleuzierez
Dit ve gweloh daouarn kaled, divreh nerzuz!"

- Eet eo, Aotrou, peurabafet: ken enoruz...
- Deuit 'ta, Jili, da zemata paotr ar vatez!
- It' ta, bihan, gand ho frouezenn bezit brokuz.
(Mouez e vammig pegen mantret, pegen mantruz!...)
(Mamm egile ra he mouezig flour ha sklokuz!...)
- N'ouez senti? Red 'vo deski, tammig lakez!
(Mouez an Aotrou, diwar uhel, rok ha spontus!..)
Gweloh dit-te, 'leh orañjez, kaoud patatez".

VI

Er zal wrezuz bez eo rivet
Diouz beg e droad da veg e vreh
Hag e jodou zo dislivet,
Hag e zremmig oll zo krizet,
Hag eo glebiet e vleo kribet
Gand c'hwezenn yen e gorvad beh.
Mamm dirazañ zo chainet.
Med int o-zri a glask an treh...

Sell an Aotrou war e ellou!
"- Ar paotr zo diaoul, med diaoulig mud?
Kaer oranjez, ral seurt mellou,
A-berz piou 'ta?... " Mamm ra sellou.
Eñ, war grenig e vuzellou:
"A-berz ma zad, e lar an dud!"
Skrijent, mammig, ho pouzellou!...
Met int o-zri da hoarzin yud....

Krenn ha souden eo dinasket
Diouz beg e droad da veg e vreh
Hag e jodou, ruz, zo lesket:
Re ' zismegañs! re ziwasket!
Gand dremm Jili en-deus stlapet
An aval-aour a zave beh...
Mamm dirazo trumm o sklankad,
Med eñ dirazo taer ha treh!

VII

Mamm ar Jili:" Skoit 'ta gantañ, Katarinig!"
Hag he divreh war ar Jili he-deus stardet,
Hag ar Jili hag an Aotrou zo divarhet:
I ken toniuz! i ar vistri! i pinvidig!

Faeuz honnez:" Von zo gwallon, dimezellig!"
Spouron warni ha sabatur, dezi darbet
Mouga ganto: " Skoit 'ta gantañ, Katarinig!"
War e vrennid divreh mammig a zo stardet...

War e jodou, amourouzig 'gren o flourig...
Med an Aotrou, penn eur ruzard, zo kounnaret:
- "N'eo ket amañ 'plego mistri da vastarded.
Kerz 'ta yarig, gand da lapous, d'az lochennig!
Paotr divergont! Gast-femalenn! Bekasinig....

- "Me, Ar Huilleg, mestr ha rener or mengleuziou,
'Vel d'an tadou, pa zizujent, 'rin d'ho mibien.
Da bep hini zo bet tonket chañs pe reuziou.
Ar hevredad, 'vel an trevad, 'n-eus e gleuziou,
E lodennou, da beb lodenn he dereziou:
Lod zo mistri, lod mevelien ha mitizien,
Lod da gemenn, lod da zenti... pe vo reuziou
'Vid seurt deom-ni, tud a zanvez ha bourhizien."

VIII

Emaint o-daou, heb ger, o vond
Ha dorn ar vamm e dorn ar mab,
Ha war he dremm 'ma c'hoaz ar bad
Gand liou ar vez ha liou ar spont.

Emaint a-zav e kreiz ar pont:
An dour zo braz ha don ar strad....
Eul lamm e-barz hag echu kont?
Ha dorn ar vamm a zach ar mab...

Med trumm hi 'wel e lagad ront,
E-barz he dorn e lamm e wad...
Ha deut en-dro he skiant-vad
Diouz tu ar ster e tistro pront...
Ha trem' ar gêr emaint o tond.

O trei o hein d'ar gaou, d'ar goap,
E trem' ar gêr hag oaled yen...
Med gand ar paotr 'ma mouez e dad:
" Er skol, ma mamm, me ' zesko mad.
Ho karoud 'rin ma buhez-pad.
Nag aon na mez arabad ken:
Pa vin ar mestr, pa vin en oad,
E lazine, me, e baotr d'an den."

Genver 1974

MARI-JAN ARGOUARH

ISTOR EUZUZ EUR VAMM-GOZ
- HA MARTEZE MEUR A HINI !-
GANET, MAGET, SAVET GANTI
EIZ A VUGALE,

HA DIVROET OLL O-EIZ:

KLUDET UHEL - PE DOUARET - MEZ O NEIZ

..PAOUR-KEZ MAOUEZ GANTI HE-UNAN

EET AMPUSTUILL GAND AR GOZNI

HA TRUBUILLET GAND HE SONJOU...

KEN DILEZET, KEN DIZONJET, KEN DIEZET

GAND HE FAMILL, GAND AN ANKOU

(HA GAND DOUE?)

MA N'EM DAOLAS NOZ EUR PELLGENT

ER PUNS DON

EVID BEUZI SONJ HA GLAHAR EN DOUR YEN

(HA KAOUD DIGOR 'N EUR BARADOZ? - NE OAR DEN!..)

- NEB A GREDFE ANAVEZOUT

PIOU PE BETRA, KAR PE VAOUEZ, PE KAR-NEZ

ZO ERBEDET MAD DA DEVEL... GAND AR VEZ !

HA GANIN-ME, PADRIG HELLEN, EO BET SKRIVET AN

DANEVELL

HA GWERZAOUET 'GIZ STAMMEREZ

'VID ABADENN PEMZEG MUNUT SKINWELEREZ

"BREIZ O VERVEL"

MAR-JAN ARGOUARH

I

He ano oa Mar-Jan Argouarh.
Eur wrahig seh, oa beh d'he hein
An amzer bet, ha leun a zrein
He halon gêz d'ar baour kêz gwrah.

He-eun o chom 'n eun tiig bah
Gand leurenn bri ha moger vein,
Ha toenn treuz-gamm oa beh d'he lein
An ilio du, al lostou-marh.

Hent braz dirag gand peulioù balh.
Er prenestr striz eur bod sandrein.
'N o zao ha beo, 'tre lochou brein,
Nemetañ ken an tiig bah,
Nemeti ken Mar-Jan Argouarh.

Ha 'n eur lared he chapeled
War he zreuzou oh heoledi
Hi ar baourez, eet berr-weled,
- Ya, 'n eur lared he chapeled-
Hi a wele dre he spered
- Pe a-wechou 'n eur vroedi,
Met 'liesoh 'n he chapeled-
Bugaligou oh heoledi.

"- Chomit aze war an treuzou!"
(Hi hel lare d'ar vugale..)
- "Chomit aze, ha dizale
Ho po heolig war ho chodou."

- "Deuit alese da glask neizou!
(Mouez an hent d'o zammig ene..)
- "Chomit aze war an treuzou!"
(Mouez ar vammig d'he bugale..)

- 'Tamm ne gollan bugaligou!
'Mon demdostig, 'z an ket keit-se!
Bez' vo distro, deuit alese
- Red eo senti ouz ma homzou:
Chomit aze war an treuzou."

Ar vugale 'deus dizentet:
War an treuzou n'int ket chomet!
Pell koulskoude eo bet tommet
Gand o "houignou" ar mên menteg.....

Ar vugale 'doa ken renket
Eet en heñchou! bet diframmet:
Diou e Pariz zo diheñchet.
Daou er brezel zo bet chomet.

Tri divroet. Eun ordrenet.
Eiz anezo he-doa bronnet.
Eiz anezo he-deus kollet.
Hag an treuzou o-deus yenet
'baoe pellig o mên benet

II

Ha boazet oa Mar-Jan Argouarh
E toull he forz da jom war hed
Dirag an hent, a-dreñv he gloued,
Alvaonet-nay, war bouez he flah.

En tiig kloz ha teñval-zah,
A-dreñv he dor, war-dro he boued,
(Netra er baill, netra en arh)
Ouz trouz er porz dalhmad war hed.

Ma wele berr, e kleve 'walh!
Kerkent ha trouz, kerkent distroet
Ouz toull an nor he horvig skoet:
- "An avel eo! War hed e oah?
O hedal piou, Mar-Jan Argouarh?.."

Bez' oa esper war he spered
Rag an oaled o vogedi.
Chom a ree mad he hleved,
Eur gwall esper war he spered
Daoust aliez bet desevet.
Rag an oaled oh anouedi
Labour dezi ha poan-spered:
Maga soñjou 'n eur zisvouedi.

"-Sach da voutou! Teh alese!
(Hi hel lare da bep hini...)
Red 'ta ganto 'leh ma kiri,
Ma vo double! plas da vale.."

Chê ma Doue! nag a daere
Gand bouteier 'traoñ an diri!
Oll int, siwaz! eet alese,
Eet e voutou gand pep hini.

Mad e kleve c'hoaz kement-se:
" Prest eo merenn! Deuit da zibri!"
Trouz al loaïou 'n o skudilli...
Doujañs Doue! nag a gerse
D'o bouteier eet alese!...

Na zassone gand o zachou
O bouteier 'vel hern kezeg
Pa ziredent diouz skol Wezeg
War he zreuzou euz an heñchou!..

Ha pa zebrent gand ragachou
Kouign-avalou, bara meleg!..
Ha pa redent d'ar vakañsou
Diouz ar glouedenn tre d'he beteg!...

Hiou, ar baotred, tomm d'o skasou?
Peseurt botou gand ar merc'hed?
Peseurt bevañs gand ar beleg?
Santoud 'ree strak o boutou
War he halon gand o zachou....

III

Na trist oa stal Mar-Jan Argouarh:
Eul liorz striz, e-leiz yeot-treuz.
E-tal ar puñs eur vodenn veuz.
Ar puñs oa yen, e zour oa sah.

Na trist he zi: dislivet rah
Poltredou koz evid he heuz.
Eur gwele kloz gand pallen kouarh,
Hag ouz ar zol ar voull lard-teuz.

Eun daol-voued vraz, hag euh an arh
Eur groazig du gand bodig beuz,
Ha sellou tru (dirag he reuz?)
Eur Galon Zakr gand livou yah...
Ha kalon drist Mar-Jan Argouarh.

Rag he frenest o voredi
Hi a wele, mezevellet,
Dre he spered heol o skedi!...
War he daoulin krog o pedi:
He bugale 'kreiz o hened
War o foltred oh euredi!...
Pe er porzig oh aspledi
Dreist ar vardell, mezevellet!..

Med er puñs-se petra 'welent?
- En dour skeduz o skeudennou
Oll 'n eur blouchad, stok o fennou
O 'n em vouchad gand bleo melen!...

Stok o chodou 'n eun afedenn,
Gand ar merhed o flezennou
Hag e c'hoarzent dre ma welent
Oll 'n eur helhig o skeudennou.

Hag a-wechou eh azezent
War ar vardell: gwall froudennou
Ha gwall hoari gand gwall bennou!...
Rag 'n eur stoui e sebezent
Gand o dremmou 'vel m'o gwelent!...

" Na'z it morse tost d'ar puñs-se
Ma bugale: Gwrah Dent-Houarn
Zo 'n e houeled. Dre ho skouarn
Hi ho sacho d'eur vro du-se

Leun 'vugale ken dizuj-ze.
Hag ho pervo 'n he fod-houarn
Eun toueller eo ar puñs-se
Hag eur roñflez Gwrah Dent-Houarn!"

Ma kendalhit war an tu-ze
D'ober din-me troiou louarn
Tomm e teuio d'ho tiouskouarn...
Chê ma Doue! ha ma ruzfe
Eun ahanoh 'barz ar puñs-se!..."

IV

N'oa den war-dro Mar-Jan Argouarh,
War-dro he zi, war-dro he fuñs.
Gand netra ken na lañs na lusk,
Na deil na bleoñ, na paotr na plah.

Miz Kerzu oa, ha gwasad mah:
Gand Pellgent louz hag amzer rust.
Sklerijenn verr en tiig bah.
E-leiz a noz e geol ar puñs.

Er mêz eo eet anez he flah,
He hoefig du a-dreuz he huch,
He daouividig leun a drusk,
He lagad leun a zourenn zah.
Er mêz eo eet Mar-Jan Argouarh...

Kloh en uhel, a-frapadou
- Noz ar Pellgent war an avel -
Zeu daveti par da hlazou...
'Leiz ar porzig zo sinadou:
Gand ar veuzenn huanadou
Ha klemmvanou eur vagadell,
Hag an ilio, a-frapadou,
Ra luskellig 'vel eur havell....

Pelloh-pella 'ma ar hleier...
Bez' eus gwazed, bez' eus gwragez
Gand bugale oll asamblez
'N eur vro du-ze, gand gouleier...

Dond daveti ra keleier
Tre d'he hraouig ha d'he stlabez,
'Touez al latar, ar glaveier,
Euz bugale 'kreiz eur palez!...

'Ma ar beleg ouz an aoter
Gand prezegenn ar garantez
'Vit emzivad hag intañvez..
Pelloh-pella o bouteier!
Pelloh-pella eur bern gevier!

V

- " N'eus den er gêr, Mar-Jan Argouarh?
- He boutou ken e-tal ar puñs!
- Ha dor an ti zo digor yud!..."
Er porz zo kaoz gand peder gwrah.

- " 'Ma bloavez mad, e ouzoh 'walh!
Gand derou mad emañ an dud!..."
...N'oa den e ti Mar-Jan Argouarh.
He boutou ken e-tal ar puñs...

...Er-mêz eo deut gand beg ar bah,
Eun druillenn hleb he zammig plusk!
- Ma Doue mad, ha bez' oh just?
Bugale ger, ha beo e oah?
Bugale vad Mar-Jan Argouarh!...

Euz 'n oll garter zo diredet
Gwragez, gwazed, amezeien:
Eur gwall zarvoud zo c'hoarvezet
Gand ar gêr-mañ: piou 'neus gwelet
D'an diweza? - Re ziwezad!
Hag erruet an archerien....
Hag e soñjer zo bet pehed.
Hag erruet ar veleien....

- 'Chesuz Doue! pebez kelou!
'N em zistrujet? Fall-galonet?
Ken e chomer peuralvaonet!
Mamm eur beleg! Ha 'n or metou!

- " Bez' emede gand kleñvedou?
- " 'Vid he fehed bez' vo daonet?
- " 'Vid ar beleg pebez kelou!
- Dre ar beleg 'vo pardonet!

- D'he bugale nag a zaelou!
Eun en Haor, daou e Naoned,
Eun e Leon zo personet,
Diou e Pariz. - Pe annezou?
- D'ar vugale dao kas kelou!..."

'N eur hoz-liñser bet takonet
Prim eo souchet ar relegou
Gand he dillad ken gwildronet,
Gand ar hoefig eet da voned,
Gand daoulagad ken spouronet
Ken spouronuz d'o speredou...
Bet eer neuze bet dizaonet
Hag enaouet zo piledou...

VI

Er serch emañ, Mar-Jan Argouarh,
Ha war ar serch ar pallenn du,
Gand goulou koar en avel-fu,
A gren o flamm a-zioh an arh.

E penn an daol an arched bah.
Ar bod sandrein zo ouz e du
Er prenest striz, e-eun o nah
E ster d'ar beuz er groazig du,

Ouz bodig beuz dizehet rah.
Ar galon Zakr ra sellou tru.
Ar grasou beill a zav an hu
War poltred paotr, war poltred plah,
War bleuniou seh Mar-Jan Argouarh.

Gand otoiou int digouezet,
Gwisket nevez, gand manegou.
Int Aotronez, Itronezed,
Gand krennarded, dimezelled,
'Liou d'an arhant, 'liou d'ar yehed.

Bez' zo galleg 'leiz o genou,
Fougaserien! - Hag ar merhed
Eo ruzlivet o muzellou...

'N Aotrou Doue d'he fardono!
Hirio mintin vo douaret
'N hini beuzet. Ha, glaharet,
Pell, ar hleier glaz a zono...

Yah an amzer, oabl dizolo,
Med ar porzig zo kailharet...
War an treuzou e tassono
Boutou pounner tud an arched...

Tud ar famill a ziloho.
Den ne jomo. Dor vo sarret.
Gand kurunenn : "D'or mamm garet"
Karr ar hañvou vo 'n araozo...
'N Aotrou Doue d'o fardono.

VII

E leh eo bet Mar-Jan Argouarh
'Ma ti 'n e boull, e zor zo brein,
Ha brein ar puñs. Gand ilio yah
Ha beuzid gouez 'ma kêr e dalh.
Peleh emañ, Mar-Jan Argouarh?
Dirag he zi, e-touez ar vein,
Gand c'hweziou mad, e klevit 'walh,
Eo chomet beo ar bod sandrein...

1973

sandrein (pe "sandren", berradur evid sandrenan evel "alhwen" evid
"alhwennan", "Rostren" evid "Rostrenen" : ar pouez-mouez a jom e leh

m'emedo). Eur blantenn peuz-brazig gand deliou munud a daol c'hwez vad
 pa flastrer anezo etre ar bizied. Bokedou dezi? n'em-eus gwelet morse.
 Kalz a louzaouennou all a zo hano anezo amañ, a-wechou eun hano roet
 dezo gand ar vugale. Med n'ouzon ket o hanoioù nag e latin nag e galleg.
 N'em-eus bet afer deuzouto nemed e brezoneg!

Taolenn

Rakskrid.....	3
Ha rakskrid all gand an aozer.....	4
Diskleriadur.....	9
 Kenta lodenn.....	17
Gouel ar beuz.....	19
Kerseenn.....	20
Ar feunteun aour.....	21
Ar bugel-mir.....	22
Med dao oa mond d'ar skol en-dro.....	24
Bez' oa 'valou leiz ma godell.....	25
Na leñvit ket.....	26
D'ar houlz ma vez a-hed ar bod.....	27
Ar paotrig goer.....	28
Gwechall er skol o c'hoari barr.....	30
.....	31
Hellenn.....	32
N'eo ket Padrig va gwir hano.....	34
 Eil lodenn.....	37
An Nevez-Amzer.....	39
Rimodell ar goukoug.....	41
Nevez amzer.....	42
Troiadenn miz ebrel.....	44
Kala-mae.....	48
Koulz ar goantiri.....	50
An hañv.....	53
Hañv.....	55
Hañv.....	59
Koulz ar faltazi.....	60
Amzer arne.....	61
Gwrah an hañv.....	62
An Diskar amzer.....	65
Gwengolo.....	67
Avalou ar gêr.....	68
Treñ miz here.....	70
Ar pardaez.....	73

Hañvig ar rozera.....	74
Ar Goañv.....	75
An eur vud.....	77
Diwar-benn ar Pont-Mên.....	78
Kala-goañv.....	81
Ar spernenn wenn.....	83
 Trede lodenn.....	 89
An daou vihan.....	91
Mari vihan.....	94
Mari vihan.....	95
Rozenn miz du.....	103
An Aotrou Breut.....	106
Nedeleg laouen.....	113
Nedeleg laouen.....	115
Mari-Jan Argouarh.....	125
Mar-Jan Argouarh.....	126

Heb mizou-kas da baea.

Nevez-embannet

Strêd paotred ar zabat, gand Visant 'n Askol,
bret embannet gand Brud Nevez. 70 lur (65 Lur evid Izili ar
Hleub).

Al leor-mañ n'eo ket bet skrivet evid barn kelennerien
Skolaj Itron Zantez Anna. An hini a zoñjfe kement-se a lakfe e
dorn en e houlou. Kontañ a ra nemetken darvoudou gwirion
c'hoarvezet er bloavezioù tregont gand eur peizantig beuzet en
eur helhiadur kevredigezel disheñvel diouz e hini, gand eun
espes droug-hirnez hag eur minhoarz gwech goapauz, gwech
tenerraet, jamez fallagr, da vihannañ hervez menoz ar skri-
vagner. Ma 'n-eus ket tizet ar pal, ho pediñ a ra d'e digareziñ.

H. Buzulier : Eur paotrig bihan dister,
embannet gand Brud Nevez.

Buhez eur paotr bihan e Treglañviz etre an daou vrezel,
eur paotr bihan "dister", evel ma lavar an oberour. Eur
vuhez diêz a-walh a-wechou, med unan beo-buhezeg ive,
leun a blijadurezioù gwechou 'zo. Unan labouruz, er skol
dreist-oll, ar skol-ze n'he-deus ket desket siwaz d'or paotr
bihan dister da ober gand e yez, med he-deus lakeet anezañ
memestra da vond war-raog, da veza gouest da veva eur
vuhez evurusoh eged hini e hendadou.

116 pajenn. 50 lur. E gwerz en oll staliou-leoriou, hag e
ti Mesidou, 40 bis, ru ar Republik, 2920 Brest (Pellg.:
98-80-49-70), heb mizou-kas.

Mikael Madeg : Sell a-dreñv war eun oberenn, eul leor 67 p., 30 lur, bet embannet gand **Brud Nevez**.

Anavezet mad eo Mikael Madeg, unan euz or re yaouank a skriv ar muia : studiou a beb seurt - lesanoioù, anoioù-lehiou - lennegezh : barzonegoù, danevellou, romantou.

Ha droad e-neus da zelled war-dreñv war e oberenn? Sur, pa'z eo honnez puill-kenañ.

El leor-ze e sav ar goulennou hag e ro ar respontchou. Mez ouspenn komz diwar e benn, e lavar dim-ni ar pezh a zoñj diwar-benn ar skrivagnerien vrezoneg all.

Den ebet ne hello chom dizeblant gand eur seurt leor, pe e vefe a-du pe a-eneb ar menoizioù displeget e-barz.

Marvaillou 1 : Kontadennoù euz Gorre Leon.

Marvaillou 2 : Kontadennoù euz Bro-Bagan hag an harzou.

Tri bkloaz 'zo e oa bet savet eur henstrivadeg kontadennoù gand R.B.I. hag ar bank "Crédit Mutuel de Bretagne". Bet enrollet hag adskrivet gand Mikael Madeg, sed amañ daou leorig anezo. Plijadur o-devo ar re a blij dezo an "istorioù drol", hag a dalvoudegezh vraz e vint evid ar re o-deus c'hoant deski distaga brezoneg evel ma tle beza greet.

30 lur peb leorig ha 40lur peb minikasedenn (25 l ha 35 lur evid Izili ar Hleub).